

# *Breizh Brevez*

J. M. Synge

**War varh d'ar mor**

(troet gand Youenn Drezen)

# BRUD

mizieg

kelaouenn  
vrezoneg

# NEVEZ

I.S.S.N. : 0339-7014

C.P.P.A.P. : 69932

Niverenn 192  
Miz c'hwevrer 1996

## Taolenn

Visant Seite : Gwenan.....	3
Gilberte Kervarreg : Aveid Fañch Mitterand.....	5
Nicolas-Saout : War bont an Hirwaz.....	7
Herve Danielou : Trouziou en diavêz.....	9
Visant Fave : Sevenadur ar geiz.....	12
Adrien, Céline, Lenaig, Tangi : Lanig ar Horrigan.....	16
J.M. Synge (Youenn Drezen) : War varh d'ar mor.....	23
J.C. Miossec : Peleh ha penaoz ha gand piou am- eus greet anaoudegez gand Breiz ha gand ar brezoneg.....	44
Yves Le Gallo (Yves Miossec) : Sant-Brieg.....	62
A. ar Merser : A beb seurt.....	73

Priz an niverenn-mañ : 20 lur

**BRUD NEVEZ**

6 ru Beaumarchais, 29200 Brest.

Pellg : 98-44-89-42. Fax : 98-80-49-70

Rener ar gelaouenn : ANDREO AR MERSER

### Evid koumananti pe adkoumananti :

Eur houmanant-bloaz a dalv evid 10 niverenn :

priz ordinal	130 lur.
koumanant-skoazell	azaleg 150 lur.
broiou estrañjour	Europa : 170 lur Broiou all : 200 lur.

Pa dremener dre eur hourater, lakaad 30% ouspenn.

Ar chekennou-bank a zo da veza kaset war-eeun da : Brud Nevez,  
6, ru Beaumarchais, 29200 Brest.

Ar chekennou-post da : Brud Nevez, K.R.P. 893-94 P Roazon.

### TAOLIT EVEZ !

An niverenn a vez merket war ar golo e-kichenn ho chomleh eo a ro deoh da houzoud pehini eo ar skwerenn ziweza emaoch da reseo da heul ho koumanant. Na zaleit ket evid paea anezañ ! Ar buanna ar gwella !

Trugarez deoh en a-raog !

Disklêriet hervez al lezenn.

Moulet gand **Mesidou**, 40bis ru ar Republik, 29200 Brest.

© evid an oll bennadou.

N'eus ket urz da adembann eur pennad diwar **Brud Nevez** heb beza bet an aotre d'hen ober.

Ar skridou hag ar pennadou a vez embannet e **Brud Nevez** n'emaint ket da veza lakeet war gont ar gelaouenn heh-unan, war gont ar re o-deus skrivet anezo hepken.

Ar skridou na vint ket embannet a vo kaset en-dro ma vez tu.

Paeroniet eo **Brud Nevez** gand **Emgleo Breiz**  
Skoazellet eo **Emgleo Breiz** gand **Kuzul Rannvro Breiz**

## Gwenan

Eun neziad gwenan dievez  
dre an nor digoret  
a nijas eun devez  
en eun ti.

Eur bann-heol alaouret  
a jach pep hini  
ouz gwerennou goret  
eur prenest serret.

Hag eno, er sklerijenn,  
e c'hoariont  
hag e kanont,  
e douster an dommijenn.

O weled kemend-all  
Monig, ar vatez,  
a zav d'he horv imor fall.

- « Sell ! Pebez lorgnez !  
Dond e-barz an ti ! »  
hag e pak peg en torch listri.  
Ha beh d'ar gwenan !...  
Euz dilorh  
ar verh

ne jomo ket eun amprevan.  
Prestig, diouz peb gwerenn,  
emaint war al leurenn,  
mahagnet  
ha flastret.

Honnez eo lezenn an dud :  
ar hillog eo mestr braz ar glud.  
Gand ar hreñva ema ar gwir.  
Ma ne gredez e paki dir,  
ken e plego da fri,  
Zoken en da di.

Visant Seite  
E Jerze, 25 10 58

## Aveid Fañch Mitterand

Kenavo doh

Bageal er reuzidigeh  
Heb c'haorzereh hag heb skolsenn  
El un hañv diwezañ.  
Deh c'hoah ho-poa aon ag ar marù  
Ar marù gwenn arriù heb trouz  
Ar garantez arriù e huñvreal  
Ar marù arriù e kousked  
Nann, nann, lara ar marù  
Red eo doh gouzañv ataù  
Med arriù eo an Ankou  
Er bed-mañ peb tra echu  
Peb tra marù !  
Goleet an anoan en ur memez flourenn  
Hiriù ho ene 'n-eus nijet  
Etrezeg ar gouleu  
Chetu-ni emzivad  
Mestr braz ! 'peus kuitaet  
Bugel ho pro e oh bremañ  
Diwisket ag ho prud  
En un arched nevez-flamm  
Froud ar hoad getañ  
Ho kalon a zo chomet staget  
E bro ho kanedigeh

En eur bez heb pinvidigeh  
Ar bord ar Charente ged ho tud  
Aze e oh ganet  
Aze ho-peus tremenet  
Aze bremañ e kousket  
Hag gwir e' a zo un Doue ?  
Degemer mad doh ma mab  
Bremañ e ouiet !

Gilberte Kervarreg

## War pont an Hirwaz

Pont an Hirwaz, eur pont neve  
Etre Bro-Leon ha Kerne,  
Te 'zo heñvel eun hent praz royal  
E Penn-ar-Bed, siell Bro-Hall !

War pont an Hirwaz 'z in eun deiz  
Da weled Brest, euz an uhel,  
Gand al lennvor gaerra e Breiz  
Hag ar batimañchou brezel.

War pont 'n Hirwaz ez in da bourmen  
Pa deuio an nevez-amzer !  
Ha neuze 'welin ar bigi gwenn  
En heol, gand o goueliou ken kaer !

War pont 'n Hirwaz e vez gwelet  
Merhed yaouank a Blougastell,  
Deiz ar pardon, deiziou eured,  
En o gwiskamant disheñvel.

War pont 'n Hirwaz 'z in da gana  
Kaniri bremañ ha gwehall  
Gand mignoned va laz-kana !  
Biken n'vo klevet kemend-all !

War pont 'n Hirwaz ez in da zañsal  
An Dro-vraz hag ar gavotenn  
Gand merhed Daoulaz pe merhed all  
Gand ar biniou hag an delenn.

War 'n Pont Hirwaz peb martolod  
A zell eüruz ouz ar mor glaz,  
Pa guz an heol, pell euz an aod,  
'N eur zoñjal en aour an treaz.

Pont an Hirwaz, da donkadur  
A zo renta servich d'an oll !  
Ar vugale, gand plijadur,  
A gano dit 'n eur vond d'ar skol !

### Jeanne Nicolas-Saout

Kanaouenn da zañsal.  
Lakaet war muzik gand Th. Bara,  
ha kanet gand kanerien St Karanteg.

## Trouziou en diavêz

En-dro din ema sioulder an abardaez  
Ha safar kirri-tan ar Via Aurelia  
Ne diz ket mui va dioukouarn.  
Koulskoude, euz an tu all d'al leon,  
A vare da vare, e teu em beteg  
Trouz ingal eur voudèrèz paduz,  
Kemmesket gand youhadennou kreñv,  
Strakadegou-daouarn ha taoliou-c'hwitell  
[skiltruz :  
Ema paotred ar skolach e-kichenn  
O c'hoari basket-ball en o zal-sport.

Dre hedall an trouz o sevel hag o koaza,  
Evel gwagennoù gorreg ar mor-braz,  
Eo êz ijina ar volotenn o vond hag o tond :  
Sioul an traou p'ema-hi 'kreiz al leurenn  
Tra ma kresk ar reuz pa dosta ouz eur paner  
Ha ma tarz ar cholori pa gouez e-barz.  
Neuze sur e lamm e gamaladed laouen  
War ar paotr ampart, tizet ar gwenn gantañ,  
Hag e kouez warnañ ar meuleudiou puill  
A-berz an arvesterien a-hed ar bevennoù.

Ha ma spered da zistrei pell a-dreñv  
D'adweled ar skolaer ma 'z on bet  
Oh evezia ouz ebatou e baotred  
War eun dachenn-hoari bennag e Breiz.  
Evid brud vad ar skol e oa red gounid:  
Gourhemennou kaloneg d'ar c'hoarier mad,  
Gwa d'ar paotr amparfal a hwite war e daol  
Ha taoliou-mouez nerzuz d'ar skipaill a-bez  
Pa zeue blaz an distrill tost  
Da blava war ar bagad fêz.

Med pa oa deuet ar maout ganeom,  
Pebez levezeg goude-ze er hombodougwiska  
Hag er harr-boutin war hent ar gêr !  
Strakal a ree ar hanaouennou drant  
Da lavared d'an oll e oam treh  
Ha ne oa strollad ebed par d'on hini.  
Deut e oa da wir on huñvreou kaer  
Ha brao e skede an dazond dirazom !...

Hirio e vousec'hoarzan pa zeu soñj din  
Euz kement-se hag euz meur a dra all  
A zeblante neuze beza a bouez braz  
Hag a gavan ken disterig bremañ.  
Red eo kaoud eur muzul hir,  
Hini an degadou a vloaziou o tremen,  
Evid dilenn ar pell diouz ar greun,  
Ar skañv diouz an talvouduz,  
An dibaduz diouz an dibaouez.

Ha koulskoude e trid c'hoaz ma halon  
Pa zeu, e-kreiz an abardaeziou klouar,  
Hekleo plijuz c'hoariou ar re yaouank  
Da zegas din koun an abadennoù a-wechall.

**Herve Danielou**

Rom, miz gwengolo 1991

## SEVENADUR AR GEIZ

Pa vez klevet ar ran e penn ar prad  
Eo poent d'an douar kaoud e had.

Pa vez an douar leun e gov gand an dour  
E teu bepred ar glao da jom a-zav.

Labour evel eun den hag a vevo kant vloaz  
Ha ped evel eun den hag a varvo warhoaz.  
*(Krenn-lavar euz bro Serbia.)*

Morse tamm avi n'am-eus bet  
Ouz eun dra n'anavezen ket.  
*(Ignoti nulla cupido)*

C'hwez vad a zo gwelloc'h eged trouz arhant.

An den yaouank, da fall pa'z a  
Ne wella ket evid koza.

Red eo terri ar graoñenn  
Evid kaoud ar vouedenn.

An hini ne zeh ket e bal  
A die beb ar mare sehi e dal.  
*(An hini ne baouez ket e bal de labourad.)*

An neb a gign e vaout er bloaz-mañ  
A vo kuit, da vloaz, d'hen touza.

Evel ma vije kavet er hêriou  
Ar mell da lipad ouz ar mogeriou.

Ar yar a goll he vi  
O kana re goude dozvi.  
Arabad kana a-raog dozvi.

An hini a zalh an askorn  
A yelo ar hi war e zorn.

An den yaouank en diegi  
A zastum poan 'vid e gozni.

N'eo ket en e gerniel eo kemer an taro  
Mond war-eeun d'ar bleiz a ve mond d'ar maro.

Na hoantait ket re  
Dipit fall ho-pije.

N'e-neus na ti nag aoz  
Heb feiz na reiz

Deus 'ta heol benniget  
Da domma korv an domestiked.

Gwir garantez da heul yehed  
A zo gwrizienn ar gwir eurusted.

Neb e-neus kalz a vugale  
A diz dezo bale  
Neb n'e-neus nemed eur pennher  
Tremen dioutañ eo e breder.

El leh m'edo an ero er bloaz-mañ  
E vo an nant er bloaz a zeu.  
*(N'eo ket atao gand ar memez re e vez an tu gorre.)*

Gand kolo hag amzer  
E teu boug ar mesper.  
*(An traou a houlen amzer da zarevi.)*

Anez ar gwin hag ar merhed  
Ne ve ket kalz a drouz er bed.

E-barz en eun tiegez  
N'eo ket ar goantiri  
O lakaad ar pod da virvi.

Pa glasker noazoud d'an hentez  
E kaver mad peb digarez.

Evid ar glao a ra  
Koulz ne raje netra.

Eur restad mad a zo mad da gaoud.

Kant bro, kant giz,  
Kant parrez, kant iliz  
Kant marhadour, kant priz  
Kant maouez, kant hiviz.

Dibaot al labour a vez greet mad  
Pa vez paeet a-raog m'eo greet.

N'eo ket diouz o ment,  
C'hwil 'oar  
E vez gwerzet ar roñsed er foar.

N'eo ket eur welienn a ra an hañv  
Nag eur barr-avel ar goañv.

Beza e heller ha beza bet  
Beza atao n'heller ket.

Beza berr ha teo  
N'eo ket beza bihan eo.  
(*Dibourvez en eun doare e heller en em baka en eun doare all.*)  
Da lavaroud eo :

Bleo en-deus  
Med n'int ket re hir.  
(*N'eo ket dibourvez ar paotr, netra a re n'e-neus avad.*)

Krenna skoulm  
A zeuer a-benn anezañ.  
(*Kement kudenn a heller dirouesta.*)

Neb a bae e zle  
A zastum leve.  
(*Galleg : Qui paie ses dettes s'enrichit.*)

M'hen tou, eme Herve,  
'Oa halet ar vuoh  
P'en-doa gwelet al leue.  
(*N'oa ket diéz dezañ gouzoud.*)

Peb mor a zo gantañ tre ha lano  
Chal ha dichal  
Gourlennn ha daere.  
(*Peb planedenn a zo ganti, tro ha tro, tu plijuz, tu dispilijuz.*)

Ma rank mond da fall dre he zeod  
N'eo ket prest da vankoud c'hoaz.  
(*Diwar-benn eur vaouez ha ne baoueze ket da gaozeal.*)

Biskoaz fri braz  
N'e-neus dizonoret fas.

Eur marichal koll e domm  
(*Eur marichal diampart.*)  
A lez an houarn da yena, e-leh e hovelriad.

Pa vezer boazet da gaoud soubenn vad  
Eo diéz goude-ze, gouzañv soubenn fall.

Nemed ha c'hoant ho-po da yun  
Prenit ho korn diouz ho putun.

An ibil ar falla  
A wigour da genta.  
(*An hini a lak an nebeuta e boan, a vez o klemm da genta.*)

An tamm hag al lomm  
A zalh an den plomm.  
Al lomm heb an tamm  
A ro d'an den lamm.

## LANIG AR HORRIGAN

Eur wech e oa,  
Eur wech ne oa ket,  
Hag eur wech e oa memez tra.

E Breiz, e Bro-Leon, e-kichenn ar mor, e veve Lanig ar Horrigan, gand e familh : e vamm, e dad, e unneg breur hag e hoar Maelduina. An hini yaouanka e oa Lanig.

Dindan eur peulvan e veve ar familh, e-kichenn eur wezenn-gelvez.

E-barz ar wezenn e veve ar zorserez Esmeralda hag a oa droug. Esmeralda ne ouie ket e veve korriganed dindan ar peulvan hag ar gorriganed ne ouient ket e oa ar zorserez o chom er wezenn.

Er goañv e oam.

Re yen e oa an amzer evid Esmeralda : mond a reas da baseal vakañsou e ti eur hamarad dezi en eur vro domm.

Yen e oa ar goañv, dreist-oll dindan peulvan ar gorriganed.

An tad a welas ne oa ket keuneud ken ! Eun deiz e kemeras e vouhal evid troha ar wezenn-gelvez.

Pa zeuas ar zorserez en-dro, e oa an noz. Selled a reas e peb leh. Peleh 'oa he gwezenn ? Selaou a reas Esmeralda. Eun trouz ! Eun trouz e-barz an noz teñval !

- Korriganed ! a lavaras ar zorserez.

Ya, ya, ar gorriganed a oa o kana :  
*Dilun, Dimeurz, Dimerher, ayota, ayota...*

Esmeralda a lavaras :

- Med, ar gorriganed eo o-deus trohet va gwezenn ! Pa vo kousket ar gorriganed, ez in da baka unan !

E-kerz an noz, e-giz he-doa lavaret, e teuas Esmeralda e-barz ti ar gorriganed. Paka a reas unan anezo : Maelduina e oa.

Diouz ar mintin e teuas ar vamm da zihuni ar vugale. P'en em gavas mamm Lanig e-kichenn gwele Maelduina, ne welas den ebed ! E-pad an amzer-ze, ar zorserez he-doa kaset ganti Maelduina beteg keo an Euzvil.

- Maelduina ? Peleh emañ ? a houlennas ar vamm.

- A, komprenet 'm-eus, a lavaras an tad. Dabord 'm-eus kavet eun tamm koad skrivet warnañ :

*SORSEREZ ESMERALDA  
35 HENT AN TOUSOG LOUEDET*

« Dre va faot eo : trohet 'm-eus gwezenn ar zorserez. Hi eo he-deus kemeret Maelduina. Bremañ, piou zo o vond da glask anezi ? »

Den ebed ne respontas, nemed Lanig a lavaras :

Me a yelo da glask Maelduina !

- Re vihan out ! Piou en-deus c'hoant mond da glask anezi ?

Den ebed n'en-doa c'hoant ! Nemed Lanig. Tad ha mamm Lanig ne hellent ket mond peogwir e oa re a vugale er gêr.

- Mad, te a yelo, va mab, a lavaras an tad. Diwall mad !

- Gortoz, emañ o vond da glask boued evidout, a lavaras ar vamm.

War-zu ar hoad ez eas Lanig.

Erruet e-kreiz ar hoad, eh en em gavas Lanig gand eun den koz. Lanig a houlenas digantañ, hag-eñ en-doa c'hoant beza sikouret evid dougen toud e geuneud. Erruet en e di, e lavaras an den koz e oa eur strobinner hag en-doa galloudou.

Lavared a reas Lanig dezañ :

- Emaon o vond da glask va hoar, anvet Maelduina, hag a zo bet paket gand eur zorserez : prizoniadez eo. Neuze ar strobinner a roas dezañ eur galloud :

- Setu amañ eur zerviedenn. Pa 'po naon, 'po ken nemed digeri ar zerviedenn ha lavared :

- « *Bataboum Roum* ». Boued forz pegement a vo war da zerviedenn...

Adkregi a reas Lanig gand e hent.

Goude meur a zevez bale, ez erruas e fas eur menez hag a oa uhel-kenañ. En em gavet e hanter ar menez, e kavas Lanig eur meuriad merien hag a zisplegas dezañ o-doa naon spontuz.

Lavared a reas Lanig lavarenn ar strobinner hag e oe leun a voued war ar zerviedenn, a-walh evid toud ar merien.

Evid trugarekaad anezañ, hag ivez evid kaoud boued forz pegement, e lavaras ar merien da Lanig :

- Emaom o vond da heuilla ahanout, forz peleh ez afes !

Eun devez goude, eh en em gavas Lanig dirag eur bleiz hag a oa bet paket e-barz eur pech.

Dioustu ez eas Lanig da zikour anezañ.

Eur wech distaget diouz ar pech, e lavaras ar bleiz da Lanig :

- Ma 'peus ezomm da veza sikouret, 'peus ken nemed lavared : « *Bleiz, va mignon !* en em drei a ri e bleiz. »

- Trugarez dit, a lavaras Lanig, salud !

Daou zevez goude eh en em gavas Lanig dirag eur ster, ha ne ouie ket penaoz treuzi anezi. En em zoñjal a reas eun tammig hag e kavas an doare :

- Merien, merien, deuit da zikour ahanon ! C'hoant am-eus treuzi ar ster.

Goulenn a reas digand ar merien ober eur pont dre en em staga an eil diouz eben. Ober a reas ar merien eur pont.

Lanig a dreuzas, aonig eun tammig. Eur wech tremenet, e lavaras trugarez d'ar merien a-raog mond gand e hent.

En tu all d'ar ster, e welas Lanig eul lochenn e-barz eur wezenn hag eur heo, diwallet gand eun Euzvil spontuz.

Lavared a reas Lanig d'ar merien :

- Kit da lakaad ar zerviedenn e-kichenn ar heo. Goude-ze e lavarin al lavarenn, ha pa vo eet an Euzvil er-méz euz ar heo da zebri, e vo red deoh mond da glask va hoar.

E-keit-se, eh en em droin e bleiz evid ober aon d'ar zorserez evid ma ne ziskennfe ket diouz he gwezenn.

Med pa'z eas kuit Maelduina euz ar heo e kemeras aon o weled eur bleiz a gomze :

Chom sioul, Maelduina, me eo da vreur Lanig. Da vreur eur all o-deus bet aon da zond da glask

ahanout. Med, red eo deom mond kuit buan a-raog ma teufe ar zorserez da baka ahanom.

Lanig ha Maelduina a gemeras eun hent all evid chom heb beza kavet gand ar zorserez.

Erruet dirag ar mor, e welas Lanig eur pesk tost maro.

- Lak ahanon e-barz ar mor, a lavaras ar pesk.

E-barz ar mor e oe lakaet gand Lanig

- Trugarez dit, paotrig. Me eo Roue ar mor. M'ho-peus ezomm euz eun dra bennag, me zo prest da zikour ahanoh.

- Ya, mar plij, c'hoant on-eus treuzi an aber-mañ !

- Mad eo, chomit amañ, bugale, emeon o vond da glask Mor-Glaz, ar valum, a lavaras Roue ar mor.

Ar merien, o-doa heuillet Lanig hag e hoar, a lavaras da Lanig :

- Ne fell ket deom treuzi an aber. Aon on-eus : ober a raim an dro vraz. En em gavoud a raim asamblez e ti an den koz.

Eun trouz braz !

- N'eo nemed Mor-Glaz, a lavaras Roue ar mor hag a oa deuet en-dro.

Lanig ha Maelduina a bignas war gein Mor-Glaz.

- Trugarez vraz, Roue ar mor ha kenavo !

E-kreiz an aber e welas Lanig eun enezenn, med a-dreñv d'e hoar e welas... ar zorserez o nijal gand he balaenn.

- Mor-Glaz ! Mor-Glaz ! Red eo deom mond war an enezenn rag ar zor... zor... zorserez zo a-dreñv deom !

War-zu an enezenn ez eas ar valum. Lammad a reas Lanig euz kein Mor-Glaz hag ez erruas war an enezenn. E hoar a reas eveltañ. Lavared a reas Lanig d'ar valum :

- Chom amañ, e foñs ar mor. E-mod-se, ar zorserez ne welo ket ahanout.

Evel eun taol kurun ez erruas eul leon e-kichenn ar vugale :

- Naon 'm-eus. Roit boued din, pe 'mod-all e tebrin ahanoh !

Ar zerviedenn a gemeras Lanig hag e lavaras : « *Bataboum Roum !* ».

Ha war ar zerviedenn e oa kalz a gig.

Al leon, e ano Kigdu, en-doa naon braz : debri a reas toud.

- Debri mad 'm-eus greet, trugarez deoh. M'ho-peus c'hoant eun dra bennag, lavarit ar frazenn-mañ : « *Leon, leon, va mignon !* »

- Trugarez dit, leon, ha kenavo !

Ar zorserez, hi, a nije gand he balaenn a-uz d'an enezenn evid klask gouzoud hag-eñ e oa Maelduina ha Lanig o vond kuit gand eur vag. Gweled a reas anezo o vond da hervel Mor-Glaz. War-zu Maelduina ha Lanig e nijas Esmeralda, buan, buan.

Lanig a welas anezi o vond warno, hag e lavaras :

- *Leon, leon, va mignon !*

Hag al leon a lammas war Esmeralda, hag ar zorserez a gouezas war an douar.

E-barz ar mor e oe lakaet, goude-ze, gand Kigdu, al leon. Roue ar mor, gand pesked all, a grogas er zorserez hag a oe lakaet e foñs toud ar mor evid ma kollfe he buhez.

E-pad an amzer-ze ez erruas Lanig hag e hoar war an tréz. War-zu ar peulvan e redas an daou vugel. En em gaved e-kichenn ar peulvan e oe klevet eur ganaouenn gorriganed : hanternoz e oa.

- *Dilun, Dimeurz, Dimerher, ayota, ayota...*

Maelduina a lavaras :

- You ou, amañ emaom !
- Toud ar famill a lavaras asamblez :
- Maelduina ! Lanig ! You ou !
- Lanig, Maelduina, kontant om o weled ahanoh !
- Trugarez Lanig ! a lavaras an tad.

Lanig a respontas en eur ziskouez e zerviedenn :

- Amañ 'm-eus eur zerviedenn he-deus eur galloud : m'ho-peus c'hoant debri e vo red lavared : « *Bataboum Roum !* », ha war ar zerviedenn e vo kalz traou da zebri.

Neuze, an tad a lavaras :

- Deus 'ta Lanig, deus 'ta Maelduina, deuit da zañsal !

Da zañsal ez eas Lanig, ha Maelduina ivez. Eur wech echu gand ar fest vihan, ez eas toud ar famill da gousked... nemed Lanig. Mond a reas ar horrigan bihan da lavared kenavo da Vor-Glaz. Eur wech lavaret kenavo d'ar valum ez eas da ginnig d'ar merien dond da veva e-kichenn ar peulvan, e-barz kef gwezenn-gelvez Esmeralda.

Lanig hag e famill a vevas eüruz-kenañ, gand o mignoned.

### **Adrien, Céline, Lenaig, Tangi.**

<sup>6</sup>ved klas diouezeg skolaj Meskoad, Landerne.  
(Kenstrivadeg an trede saloñs evid ar re yaouank e Breiz).

**J.M. SYNGE**

## **WAR VARH D'AR MOR**

Troet e brezoneg gand  
Youenn Drezen

Eil moulladur  
(Moulet evid ar wech kenta gand  
« Levaoueg Gwalarn » e 1926)

## Notenn

John Millington Synge a zo unan euz ar skrivagnerien a roas da Iwerzou eur c'hoariva broadel. Evel Yeats, e saozneg eo en-deus skrivet, daoust m'en-doa klasket deski an iwerzoneg,- hag ar brezoneg ivez, war a lavarar.

Ganet e oe e 1871. Setu amañ roll e beziou-c'hoari :

- E skeud an Draonienn (1903),
- War Varh d'ar Mor (1904),
- Puñs ar Zent (bet c'hoariet e brezoneg gand Strollad Plougin)
- Lapous-den Penn-ar-Bed (bet c'hoariet e brezoneg gand Strollad Penn-ar-Bed),
- Eured ar Pilliger, (1907),
- Deirdre an Ankeniou, *embannet goude e varo.*

Mervel a reas e 1909.

Skrivet en-deus ouspenn eul levr studiennoù : Inizi Aran (1907) ha Barzonegou ha Troidigeizou (1909).

## Tud ar c'hoari

MAI, *eur vaouez koz.*

BERTELE, *he mab.*

KATELL, *he merh.*

NORA, *he merh.*

Gwazed ha maouezed euz an enezenn.

Leh : Unan euz enezennoù Aran, e kornog Iwerzou. Kegin eur penn-ti, gand rouedou, siredou, eur harr-neza, plenk nevez harpet ouz ar voger, hag all. Katell, eur plah yaouank war-dro ugent vloaz, a beurechu mera eun dorz. Lakaad a ra an dorz er forn e-kichenn an tan. Nêtaad a ra he daouarn goude, ha staga a ra da neza. Nora, eur baotrez yaouank, a astenn he fenn e toull an nor.

## Nora

(*A vouez izel.*)  
Peleh ema-hi ?

## Katell

En he gwele ema-hi, siwaz dezi, ha kousket emichañs, ma hell kousked.

## Nora

(*A zeu tre, didrouz, hag a denn eur pakad a-zindan he frileuzenn.*)

## Katell

(*O kas ar harr-neza prim en-dro.*)  
Petra 'zo ganeoh aze ?

## Nora

Degaset int bet bremaig gand ar beleg yaouank : eur roched hag eul loer stamm bet kavet war eun den beuzet e bro Dun na nGall.

## Katell

(*A harz he rod en eun taol trumm, hag a stou da selaou.*)

## Nora

Ni a ranko gweloud ha bez' e oant da Vikael, e-pad ma vo mamm en traoñ o selloud ouz ar mor.

## Katell

Penaos e hellfent beza da Vikael, Nora ? Penaos en-dije gallet mond keid all, du-hont en hanternoz ?

**Nora**

Ar beleg yaouank a lavar en-deus gwelet kement-se o hoarvezoud. « Ma oa an traou-ze da Vikael », emezañ, « e hellit lavaroud dezi en-deus bet eun interamant deread, a-drugarez Doue ; ha ma n'int ket dezañ, arabad da hini ebed ranna grik diwar o fenn. Rag paka a rafe he maro », emezañ, « o leñva hag o klemm. »

*An nor hanter zerret gand Nora a zo digoret braz gand eur barrad avel.*

**Katell**

*(O selloud er-mêz, strafuillet).*

Goulennet hoh-eus outañ ha miroud a rafe ouz Bertele da vond hizio gand ar hezeg da foar Gailaim ?

**Nora**

« Ne virin ket outañ », emezañ, « mez arabad deoh kaoud aon. Ho mamm a vez o lavaroud pedennou an hanter vrasa euz an noz. An Aotrou Doue ne lezo ket anezi », emezañ, « heb mab beo ebed. »

**Katell**

Ha fall eo ar mor e-kichenn ar herreg gwenn, Nora ?

**Nora**

Ya, fall a-walh. Eur gwall drouz a zo er hornog, ha mond a ray war wasaad pa droio ar mor eneb an avel.

*(Mond a ra d'an daol gand ar pakad).*

Digoret e vo bremañ dioustu ?

**Katell**

'M-eus aon e tihuno, hag e tegouezo warnom a-raog m'or-bezo echu.

*(O tostaad ouz an daol).*

Eur pennad mad e vezim, ha ni o leñva on-diou.

**Nora**

*(A ya da zor ar penn all hag a zelaou).*

Fiñval a ra en he gwele. Erru e vo heb dale.

**Katell**

Roit din ar skeul m'o lakain e toull ar mouded. Evel-se ne ouezo netra diwar o fenn. Ha marteze d'an izelvor e tiskeno-hi da weloud ha n'eo ket deut gand al lano diouz ar reter.

*(Lakaad a reont ar skeul ouz ar siminal).*

**Katell**

*(A zav eun nebeud pazinier hag a guz ar pakad e toull ar mouded. Mai a zeu diouz ar penn all).*

**Mai**

*(O selloud ouz Katell, dirukell).*

N'hoh-eus ket mouded a-walh da ober an deiz hag an abardaez ?

**Katell**

Eun dorz am-eus lakaet war an tan n'eus ket pell *(o teurel mouded war al leur-di)*, ha Bertele en-devo ezomm anezi d'an izelvor, ma 'z a da Gonmainene Mara.

**Nora**

*(A zastum ar mouded, hag o hempenn en-dro d'ar forn).*

**Mai**

*(Oh azeza war eur skaon e-kichenn an tan).* Ne day ket hizio, p'ema an avel o sevel diouz ar Mervent. Ne day ket hizio, rag ar beleg yaouank, heb mar ebed, a viro outañ da vond.

**Nora**

Ne viro ket outañ da vond, mamm ; ha klevet em-eus Eamaon Simon, ha Stefan Pheety ha Collum Shawn o lavaroud e vije eet.

**Mai**

Peleh ema Bertele ?

**Nora**

Diskennet eo da weloud ha ne vo ket eur Vag all o lakaad da ouel ar zizun-mañ, ha me 'gred ne zaleo ket mui da zond en-dro, rag diskenn a ra ar mor en-dro d'ar Beg Glaz, hag ema ar vag o trei d'ar huz-heol.

**Katell**

Klevoud a ran unan bennag o tremen ar herreg braz.

**Nora**

*(O selloud er-mêz).*

Ema o tond, ha tiz warnañ.

**Bertele**

*(A zeu tre hag a zell en-dro d'ar gambr. Trist ha sioul eo e vouez).*

Katell, peleh ema ar penn kordenn nevez a zo bet prenet e Eonmaiene Mara ?

**Katell**

*(O tiskenn).*

Roit anezañ dezañ, Nora. Ouz eun tach ema, e-kichenn ar pleñk gwenn. Itribillet em-eus anezañ ar mintin-mañ, rag an houh e baoiou du a oa o tebri anezañ.

**Nora**

*(Oh astenn dezañ eur penn kordenn).*

Hemañ eo, Bertele ?

**Mai**

Mad e rafeh, Bertele, lezel ar gordenn-ze a-istribill e-kichenn ar pleñk.

*(Bertele a gemer ar gordenn).*

Ezomm a vo anezi amañ, a lavaran-me deoh, ma teu korv Mikael gand al lano warhoaz vintin, pe ar mintin goude,

pe eur mintinvez bennag er zizun. Rag eur bez don a lakaim toulla dezañ, mar deo bolontez Doue.

**Bertele**

*(O staga da labourad gand ar gordenn).*

N'em-eus gwestenn ebed da vond en traoñ war gein ar gazeg, ha red eo din mond kuit dioustu, ha buan. Ne vo bag ebed nemed houmañ ahann da ziou zizun pe ouspenn, hag ar foar a vo eur foar gaer evid ar hezeg, hervez m'em-eus klevet an dud o lavaroud en traoñ.

**Mai**

Traou kaled a vo lavaret en traoñ mar deo kavet ar horv, ha gwaz ebed amañ evid farda an arched, goude m'em-eus-me roet eur bern moneiz evid ar brava pleñk gwenn a oa da werza e Conmaiene Mara. *(Hi a sell ouz ar pleñk).*

**Bertele**

Penaoz e vefe kavet ? Bet om bemdez e-pad nao devez o selloud, hag an avel a hwez kreñv abaoe eur pennad diouz ar mervent.

**Mai**

N'eo ket bet kavet. Mez savet eo bet ar mor gand an avel-ze, hag eur steredenn oa eneb al loar pa zave en noz. Pa vefe kant marh, pe mil marh a ve ganeoh, petra eo priz mil marh e-keñver eur mab, e-leh n'ez eus mab nemetañ ?

**Bertele**

*(O labourad war ar westenn, da Gatell) :* C'hwi a ziskenno bemdez da weloud ha ne lamm ket an deñved war ar zegal, ha ma teu ar marhadour dour dre aze, e hellot gwerza an houh e baoiou du, mar deus priz mad warno.

**Mai**

Penaoz e hallfe ar seurt hini tenna eur priz mad diouz eur penn-moh ?

**Bertele**

Ma chom an avel er hornog gand karter diweza al loar, it gand Nora da gerhad geot a-walh evid golei eur bern bezin all. Diêz e vezim lakaet amañ diwar hizio, gand eun den nemetken en ti da labourad.

**Mai**

Diêz e vezim lakaet an deiz ma viot beuzet evel ar re all. Penaoz e rin-me ? Penaoz e ray ar merhed ? Ha me eur vaouez koz stouet bremañ war ar bez ?

**Bertele**

*(Bertele a laka ar westenn war an douar, a denn e chupenn-bemdez, hag a wisk unan nevesoh euz an heveleb danvez).*

**Bertele**

*(Da Nora). Erru eo ar vag beteg ar hal ?*

**Nora**

*(O selloud er-mêz). O vond e-biou d'ar Beg Glaz ema-hi hag o teurel he lien en traoñ.*

**Bertele**

*(O kemer e yalh hag e vutun). Eun hanter eur am-bo da ziskenn. Va gweloud a reot o tond en-dro a-benn daou zevez, pe dri devez, pe bevar devez marteze, mar deo fall an avel.*

**Mai**

*(O tistrei ouz an tan, hag o lakaad he frileuzenn war he fenn).*

Ma n'eo ket hennez eun den kriz ha digalon, ha na glev ket eur gomz digand eur vaouez koz o klask miroud outañ da vond d'ar mor !

**Katell**

Buhez eur gwaz yaouank eo mond d'ar mor. Piou a zelaouo ouz eur vaouez koz o randoni atao ar memez tra ?

**Bertele**

*(O kemer ar westenn).*

Red eo din mond kuit bremañ, ha buan. Pignad a rin war ar gazeg hell, hag an ebeul glaz a haloupo war he lerh... Doue r'ho pennigo.

*(Mond a ra kuit).*

**Mai**

*(O hopal tra m'ema war dreuzou an nor).*

Eet eo kuit bremañ, va Doue, ha ne welim mui anezañ. Eet eo kuit, ha pa gouezo an noz du, me a chomo heb mab ebed war an douar.

**Katell**

Perag n'hoh-eus ket roet dezañ ho pennoz, p'en-deus sellet war e lerh e toull an nor ? N'eus ket kalonad a-walh gand pep hini en ti-mañ, heb ma oa red deoh e lezel da vond heb eur ger a chañs vad war e lerh ha gand eur ger garo en e skouarn ?

**Mai**

*(A grog er piñsetez hag a stag da vrocha an tan dizoñj-kaer heb selloud a-dreñv he hein).*

**Nora**

*(A-daol-trumm).*

Gwerhez benniget, Nora ! Ankounac'haet on-eus e damm bara.

*(Mond a ra beteg an oaled).*

Ha mervel a ray gand an naon o vond evel-se beteg an noz teñval. N'en-deus debret tamm ebed abaoe m'eo savet an heol.

**Katell**

*(O tenna an dorz diouz ar forn).*

Mervel a ray sur gand an naon. Ne chom e skiant-vad gand den ebed en eun ti, gand eur vaouez koz o randoni heb ehan.

**Mai**

*(A vransigell war he skaon).*

**Katell**

*(O troha eun tamm bara hag ouz e baka en eul lien ; da Vai).*

Diskennit d'ar stivell ha roit an dra-mañ dezañ pa dremeno. E weloud a reot neuze, hag ar ger teñval a vo torret. Ha galloud a reot lavaroud « Doue ho sikouro », evid ma vo ésaet e spered.

**Mai**

*(O kemer ar bara).*

Bez' e vin eno kerkent hag eñ ?

**Katell**

Mar dit buan.

**Mai**

*(O sevel en eur horjella).*

Me a zo fall kenañ da vale.

**Katell**

*(O selloud outi gand nehamant).*

Roit dezi ar vaz, Nora, gand aon na zeufe da streboti war ar herreg braz

**Nora**

Peseurt baz ?

**Katell**

Ar vaz a oa deut gand Mikael euz Eonmaione Mara.

**Mai**

*(O kemer ar vaz ema Nora o rei dezi).*

Er bed braz ema ar hiz gand ar re goz lezel traou war o lerh gand o faotred hag o bugale. Amañ, avad, ema ar hiz gand ar baotred yaouank lezel traou war o lerh gand ar re goz.

*(Mond a ra er-mêz goustad. Nora a ya beteg ar skeul).*

**Katell**

Gortozit, Nora, gand aon na zeufe en-dro raktal. Ken glaharet eo, Gwerhez binniget, ma n'oh ket evid gouzoud petra raio.

**Nora**

Eet eo en tu all d'ar vodenn strouez ?

**Katell**

*(O selloud er-mêz).*

Eet eo en tu all. Taolit anezañ d'an traoñ buan, rag an Aotrou Doue a oar peur ez ay er-mêz adarre.

**Nora**

*(O tenna ar pakad diouz an toull mouded).*

Ar beleg yaouank en-deus lavaret e vije bet war an tu-mañ warhoaz, hag e helljem diskenn da lavaroud ha bez' e oant traou Mikael.

**Katell**

*(O kemer ar pakad).*

Ha lavaret en-deus penaoz int bet kavet ?

**Nora**

*(O tiskenn).*

« Bez' e oa daou zen », emezañ, « o roeñvad gand gwin-ardant a-raog kan ar hillog, ha roeñv unan anezo a yeas a-benn er horv, pa oant o vond e-tal tornaod du an Hanternoz ».

**Katell**

*(O klask digeri ar pakad).*

Roit din eur gontell, Nora ; ar gordenn a zo poaz gand an dour zall, hag eur skoulm dall a zo enni, na vefe ket dirouestlet en eur zizun.

**Nora**

*(O rei dezi eur gontell).*

Klevet em-eus ez eus pell ahann da vro Dun na nGall.

**Katell**

*(O troha ar gordenn).*

Pell avad. Amañ ez eus bet eun den n'eus ket pell, - an hini en-deus gwerzet dim ar gontell-mañ, - ha lavaroud a ree ma 'z afe unan en hentou diouz ar herreg du-hont, e lakafe seiz devez da vond da vro Dun na nGall.

**Nora**

Ha pegeid e lakafe eun den kaset gand an dour ?

**Katell**

*(A vouez izel).*

Gwerhez binniget, Nora ! diêz eo lavaroud hag e oant dezañ !

**Nora**

Ez an da dapoud e roched diouz an tach, hag e hellim lakaad an eil flanelenn war eben. *(Klask a ra e-touez an dilladou istribillet er hogn).* N'ema ket en o zouez, Katell, peleh e hellfe beza ?

**Katell**

Bertele, moarvad, en-deus gwisket anezi ar mintin-mañ, rag e roched dezañ a oa eet pounner gand an hollen a oa warni. *(O tiskouez ar hogn gand he biz).* Setu eun tamm mañch hag a oa euz an heveleb danvez. Roit anezañ din ma welin.

*(Nora a zegas dezi ar vilgin, ha lakaad a reont keñver-ha-keñver an diou flanelenn).*

**Katell**

An heveleb danvez eo, Nora. Mez c'hwi oar mad ez eus rolladou braz euz an danvez-se e staliou Gaillilm, ha meur a zen all a hall kaoud eur roched deuz an danvez-se.

**Nora**

*(He-deus kemeret al loer ha kontet ar maillennoù, o leñva).*

Loer Mikael eo, Katell, loer Mikael eo, Doue da bardono d'e ene. Ha petra lavarou mamm pa glevo ar helou, ha Bertele war vor ?

**Katell**

*(O kemer al loer).*

Eul loer-stamm eo.

**Nora**

Hemañ a zo an eil euz an tri re am-boa greet. Tri-ugent mailenn a reen da genta, peder nebeutoh goude-ze.

**Katell**

*(O konta ar maillennoù).*

An niver-ze a gaver ! *(o leñva).* A, Nora, ma n'eo ket eun druez... du-hont, pell en hanternoz, heb den ebed da ouela dezañ, nemed ar sorserezed du a vez o nijal war horre ar mor ?

**Nora**

*(O trei hag o stlepel he divreh war an dillad).*

Ma n'eo ket eun druez soñjal ne chom netra war-lerh eur gwaz, hag a oa eur roeñver hag eur pesketaer braz, nemed eun tamm roched koz hag eul loer stamm !

**Katell**

*(A-benn eur pennad).*

Lavarit din hag ema mamm o tond, Nora ? Me a glev eun tammig trouz war ar wenodenn.

**Nora**

*(O selloud er-mêz).*

Hi eo, Katell. Ema o tond war-du an nor.

**Katell**

Sammit an dra-ze kuit a-raog ma teuio en ti. Marteze e vo sioulloh bremañ m'he-deus roet he bennoz da Verteles, ha ni a raio evel ma ne oufem netra e-pad ma vo war vor.

**Nora**

*(O harpa Katell da gloza ar pakad).*

Lakaom anezo amañ er hogn.

*(Lakaad a reont an traou en eun toull e kogn ar siminal.*

*Katell a ya en-dro d'he harr-neza).*

Ha gweloud a ray ez oan o ouela ?

**Katell**

Troit ho kein d'an nor evid ma ne vo ket ar sklerijenn warnoh.

*(Nora a azez e korn an oaled, troet he hein ganti d'an nor.*

*Mai a zeu en ti goustad-goustad, heb selloud ouz ar merhed, hag a ya d'azeza war he skaon en tu all d'an tan. Al*

*lien gand an tamm bara a zo atao ganti en he dorn. Ar*

*merhed a zell an eil ouz eben, ha Nora a ziskouez an tamm bara gand he biz).*

**Katell**

*(Goude beza nezet eur pennad).*

N'hoh-eus ket roet dezañ e damm bara ?

*(Mai a stag da hirvoudi a vouez izel, heb trei he fenn)*

**Katell**

Gwelet hoh-eus anezañ o vond e-biou ?

*(Mai a gendalh da hirvoudi).*

**Katell**

*(Eun tammig prim).*

Gwerhez Vari, ha ne ve ket gweloh deoh sevel ho mouez da lavaroud petra hoh-eus gwelet, eged chom da vaga klemmou evid ar pezh a zo c'hoarvezet ? Ha gwelet hoh-eus Berteles, a lavaran-me deoh?

**Mai**

*(Gand eur vouez dinerz).*

Me a zo rannet va halon evid atao.

**Katell**

*(Evel a-raog).*

Ha gwelet hoh-eus Berteles ?

**Mai**

Gwelet em-eus an euzusa tra.

**Katell**

*(A ziskrog diouz he harr-neza hag a ya da zelloud er-mêz).*

Gwerhez Vari, setu Berteles war gein ar gazeg e-kichen ar Beg Glaz, hag an ebeul loued war e lerh.

**Mai**

*(A skrij, ken e kouez he frileuzenn diwar he fenn, o tiskouez bleo gwenn fuillet. Gand eur vouez spontet).*

An ebeul loued war e lerh...

**Katell**

*(O tond war-du an tan).*

Petra a hoarvez ganeoh eta ?

**Mai**

*(O komz goustad-goustad).*

Gwelet em-eus an euzusa tra a zo bet gwelet gand den abaoe an deiz ma welas Dara an llini maro gand ar bugel war e zivreh.

**Katell ha Nora**

A !  
(*Klucha a reont e-kichenn ar vaouez koz dirag an tan*).

**Nora**

Lavarit dim petra hoh-eus gwelet.

**Mai**

Diskennet ez oan d'ar stivell, ha chom a ris eno o lavaroud eur bater a vouez izel. Neuze e teuas Bertele, war gein ar gazeg hell gand an ebeul loued war e lerh, (*Astenn a ra he daouarn, e-giz evid skoacha eun dra bennag diouz he daoulagad*). Jezuz ra gemero truez ouzim, Nora !

**Katell**

Petra hoh-eus gwelet ?

**Mai**

Gwelet em-eus Mikael e-unan.

**Katell**

(*Gand eur vouez flour*).  
N'hoh-eus ket, mamm. N'eo ket Mikael hoh-eus gwelet, rag e gorv a zo bet kavet du-hont nevez a zo, pell en hanternoz, ha bet en-deus eun interamant deread, a-drugarez Doue.

**Mai**

(*Dicheg eun tammig*).  
Gwelet em-eus anezañ bremaig, o haloupad war gein e varh. Bertele a zeue da genta war ar gazeg hell, ha klask a ris lavaroud, « Doue ra vo ganeoh ». Med eun dra bennag a vougas ar geriou war beg va zeod. Mond a reas e-biou prim-ha-prim. « Bennoz Doue deoh », emezañ, ha n'hellis ranna grik. Sevel a ris va daoulagad neuze, hag o ouela, war an ebeul loued. Ha Mikael a oa warnañ, gwisket gantañ dillad brao, ha botou nevez en e dreid.

**Katell**

(*O staga da hirvoudi*).  
Echu eo ganim diwar hizio. Echu eo.

**Nora**

Ar beleg yaouank en-doa lavaret koulskoude na vije ket bet lezet gand an Aotrou Doue heb mab ebed.

**Mai**

(*Gand eur vouez izel, hogen frêz*).  
Nebeud ar pezh a oar hennez diwar-benn ar mor... Bertele a vo kollet bremañ. Galvit Eamon da lakaad ober din eun arched mad gand ar pleñk gwenn, rag ne chomin ket beo war o lerh. Eur gwaz am-eus bet, ha tad eur gwaz, ha c'hweh mab en ti-mañ, c'hweh den kaer, daoust m'am-eus bet poan vraz ouz o lakaad war an douar. Darn anezo a zo bet kavet, ha darn anezo n'int ket bet. Ma ! Eet int oll bremañ... Stefan ha Yann kollet en avel vraz, ha kavet goude e pleg-mor Gregor e Henou Aour, ha degaset amañ an eil hag egile war an heveleb planken, dre an nor-ze.  
(*Tevel a ra eur pennad. Ar merhed a skrij evel m'o-dije klevet eun dra bennag dre an nor damzigor a-dreñv o hein*).

**Nora**

(*A vouez izel*).  
Klevet hoh-eus an dra-ze, Katell ? Klevet hoh-eus trouz er biz ?

**Katell**

(*A vouez izel*).  
Unan bennag o harmi war an aod.

**Mai**

(*A gendalh heb klevoud netra*).  
Neuze e oe Youenn hag e dad, ha tad hemañ ouspenn, a oe kollet en eun nozvez teñval. Ha pa zavas an heol ne oe gwelet nag eun tamm plankenn na netra. Goude, Padraig a

oe beuzet pa droas e vag war he genou. Edon azezet amañ gand Bertele, eul hrouadurig anezañ, kousket war va barlenn pa welis diou vaouez, ha teir maouez ha peder maouez o tond en ti, oh ober sin ar groaz heb ranna ger. Selloud a ris er-mêz neuze. Bez' e oa gwazed o tond war o lerh, o tougen eun dra bennag en eun tamm gouel ruz ; an dour a zivere dioutañ, - brao oa an amzer, Nora, - hag e lakae eur roudenn beteg an nor.

*(Tevel a ra adarre, astennet he dorn etrezeg an nor. Houmañ a zigor goustad, ha maouezed koz a zeu en ti, oh ober sin ar groaz en eur dremen an treuzou hag o taoulina war a-raog ar c'hoarileh, lostennou ruz sachet ganto war o fennou).*

**Mai**

*(En eun damhuñvre, da Gatell).*  
Padraig eo, pe Vikael pe betra ?

**Katell**

Mikael a zo bet kavet nevez 'zo, pell du-hont en hanternoz, ha mar deo bet kavet eno, n'hell ket beza amañ bremañ.

**Mai**

Bez' ez eus eur bagad paotred yaouank kaset-degaset bepred gand ar mor. Penaoz e hellfe an dud gouzoud ez oa Mikael an hini oa, pe eun den all heñvel outañ ? Pa zo bet eun den er mor e-pad nao devez, gand an avel dirollet, e vamm heh-unan a vefe tenn dezi lavaroud piou oa.

**Katell**

Mikael an hini oa, Doue d'e bardono, rag nevez degaset eo bet dim lod euz e zillad euz an hanternoz.

*(Tenna a ra diouz o zoull kuz ha kinnig a ra da Vai an dillad a oa da Vikael. Mai a zav goustad hag a gemer an dillad en he daouarn. Nora a zell er-mêz).*

**Nora**

Emaint o tougen eun dra bennag ; divera a ra an dour dioutañ, ken e chom eur roudenn war e lerh e-kichenn ar herreg braz.

**Katell**

*(A vouez izel d'ar merhed a zo deut en ti).*  
Bertele ez eo ?

**Unan euz ar merhed**

Ya, siwaz, Doue d'e bardono.

*(Diou vaouez yaouankoh a zeu tre hag a zoug an daol e-kreiz an ti. Neuze gwazed a zegas korv Bertele astennet war eur plankenn, gand eun tamm lien warnañ, hag a laka ar plankenn war an daol).*

**Katell**

*(D'ar merhed, e-pad m'ema ar wazed gand al labour-ze).*  
Penaoz eo bet beuzet ?

**Unan euz ar merhed**

An ebeul loued en-deus e vountet er mor, ha taolet eo bet en-dro el leh ez eus tarziou braz war ar herreg gwenn.

*(Mai a zo eet da zaoulina ouz penn an daol. Ar merhed a hirvoud flourig en eur horjella goustad. Katell ha Nora a zaoulin ouz penn all an daol. Ar wazed a zaoulin e-kichenn an nor).*

**Mai**

*(O sevel he fenn hag o komz evel ma ne welfe ket an dud en-dro dezi).*

Eet int oll kuit bremañ, ha n'eus mui netra hag a hellfe ar mor ober din... N'em bezo ezomm ken da zevel da ouela ha da bedi pa hwezo avel ar hreisteiz, ha pa glevor tarziou ar reter ha tarziou ar hornog o vaga cholori braz o steki an eil gand egile. N'em-bezo ezomm ken da ziskenn da gerhad dour benniget en noziou teñval goude an Ollzent, ha ne vin ket chalet gand doare ar mor pa vo ar merhed all oh

hirvoudi. (*Da Nora*). Roit din an dour benniget, Nora ;  
chom a ra eur beradig c'hoaz war ar ganastell.

(*Nora a ro dezi an dour benniget*).

#### Mai

(*A daol dillad Mikael a-dreuz war dreid Bertele hag a  
skuill an dour benniget warnañ*).

N'eo ket abalamour n'em-boa ket pedet evidoh, Bertele, an  
Aotrou Doue. N'eo ket abalamour n'em-boa ket lavaret  
pedennou en noz teñval ken n'ho-pije ket gouezet petra  
edon o lavaroud. Mez eun ehan braz am-bo bremañ, ha  
poent eo, m'hel lavar. Eun ehan braz am-bo bremañ hag  
amzer da gousked mad e-pad an noziou hir goude an  
Ollzent, ha pa n'or-bije zoken nemed eun tamm bleud gleb  
da zebri hag eur pesk leun a flaer marteze.

(*Daoulina a ra adarre, en eur ober sin ar groaz hag en eur  
lavaroud pedennou a vouez izel*).

#### Katell

(*D'eur hoziad*).

C'hwi hag Eamon marteze a hellfe ober eun arched pa zavo  
an heol. Pleñk gwenn ha kaer on-eus, bet prenet ganti  
heh-unan, siwaz dezi, o soñjal e vije kavet Mikael, hag  
eun dorz fresk am-eus, a hellot debri e-pad ho labour.

#### Ar hoziad

(*O selloud ouz ar pleñk*).

An tachou a zo ganto ?

#### Katell

N'emaint ket, Colum, n'on-eus ket soñjet en tachou.

#### Eur gwaz all

Eur souez eo n'he-deus ket soñjet en tachou, kement a  
archedou evel m'he-deus gwelet ober.

#### Katell

Mond a ra koz, ha rannet eo he halon.

(*Mai a zav adarre goustad-goustad, hag a led tammou  
dillad Mikael e-kichenn ar horv, en eur skuilla warno  
beradou diweza an dour binniget*).

#### Nora

(*A vouez izel da Gatell*).

Sioul eo bremañ, hag habask ; hogen an deiz ma oe kavet  
Mikael, ho-pije klevet anezi o harmi ahalenn d'ar stivell.  
Hounnez a gare muih Mikael. Piou en-dije kredet ?

#### Katell

(*Frêz ha goustad*).

Eur vaouez koz a ya buan skuiz gand kement a ra. Ha  
daoust ha n'ema ket abaoe nao devez o harmi hag oh  
hirvoudi, hag o vaga kalonad vraz dre an ti ?

(*Mai a laka ar werenn houlo war he genou war an daol,  
hag a groaz he daouarn war dreid Bertele*).

Emaint oll a-gevred bremañ, hag echu eo an abadenn. An  
Aotrou Doue ra gemero truez ouz ene Bertele, hag ouz ene  
Mikael, hag ouz eneo Youenn ha Padraig, ha Stefan ha  
Yann (*Ostoui he fenn*) ; ha ra gemero truez ouz va ene,  
Nora, hag ouz ene kement hini a zo c'hoaz o vale war an  
douar.

(*Tevel a ra. An hirvoud a zav eun tammig kreñvoh a douez  
ar merhed, hag a dav goude*).

#### Mai

(*O kenderhel*).

Mikael en-deus bet eun interamant deread, pell du-hont  
en hanternoz, a-drugarez Doue. Ha Bertele en-devo eun  
arched kaer greet gand ar pleñk gwenn, hag eur bez don.  
Petra a fell dim kaoud ouspenn ? Den ebed n'hall beva da  
viken, ha dleet eo dim en em gavoud mad evel-se.  
(*Daoulina a ra adarre, hag ar ouel a ziskenn goustad*).

## **Peleh ha penaoz ha gand piou am-eus greet anaoudegez gand Breiz ha gand ar brezoneg**

E Strasbourg edon o chom e fin ar bloaz 1972. Perag e Strasbourg ?

E Bro-Elzas ez eus labouradegou e-leiz hag a ra war-dro danvezioù 'zo hag a zo implijet e bourz ar batimañchou brezel ; an tankou, ar hirri-nij ha me oarme. Strevet int eun tammig e peb leh war gompezenn Elzas. Unan anezo a zo bet savet e-kichen tachenn vrezel brudet Reischofen ha pa weler an torgennou, ar parkou, ar hoajou eno, diêz soñjal en emgann kaled a oa bet eno e fin an eil impalaerez. Setu perag ez eus ezomm euz tud a vicher evid gweled a-dost penaoz ema kont gand an uziniou-ze evid ar pez a zell ouz ar pourvezioù a zo gwerzet d'an arme ha d'ar marin a vrezel. Teurel evez ouz ar prizioù, an daleou, talvoudegez an traou, setu petra e oa va micher d'an ampoent, da lavared eo : enseller war an uziniou. Eur vicher blijuz e oa hag he-doa lakeet ahanon da geja gand eur mor a dud. E oaled an ofiserien edon o chom. Eur gambr vrao a oa bet roet din ha mad kenañ e oa ar geustereenn enni. Eun tammig goapauz e oa an ofiserien e-keñver distagadur tud ar vro ha meur a istor farsuz, sañset, a oa kontet diwar-benn o zaol-

mouez. Gwir eo e teue ganto, e galleg, kemmadurioù war an tu gin : « A ! Fous êtes Preton ? » Med ken gwir all e oa ive goulennet ouzint ganto : « Euz Brest emao evid doare. » Rag distagadur kerbenn veur Penn-ar-Bed a oa ganin war va zeod. Evel ma lavarer : « Kant bro, kant giz », ha giz Brest a oa ganin. Ne lavaran ket giz Breiz...

Lezennou ispisial 'zo e Bro-Elzas. An Almanted hag ar Hallaoued o-deus dalhet d'ar reizioù bet roet d'ar vro abaoe an Dispah braz. A-beb eil eo bet mestroniet ar vro ganto. Ha tud ar vro a zo eet skuiz gand kement a jeñchamañchou en eur ober ken nebeud amzer. An Almant hag ar Gall o-deus miret ar peziou mad bet roet d'ar vro an eil war-lerh egile. Ar veleien, da skwer, a zo gopret gand ar Stad. Ha n'int ket evid labourad evid eur bennoz Doue. Lezennou ar Hoñsulad a zo lakeet da vond en-dro evid ar pez a zell ouz ar berejou. An alamaneg eo, dre-vraz, ar yez estren kenta a vez desket er skolioù. Ez-tre eo selled ouz an tele alamaneg. Ral a wech on-eus tro e Strasbourg gweled ruiou lakeet eun ano-den bennag warno. Meur a-wech am-eus goulennet ouzint va-unan ha ne oa ket an dra-ze eun abeg politikel ?

Eur blasenn Gutenberg a zo e-kichen an iliz veur. Eur blasenn Broglie ive hag e-kreiz kêr ema an hini vrudreta, plasenn Kleber eo, gand skeudenn ar jeneral en he hreiz. Med evid ar pez a zell ouz ar ruiou all e oa bet roet dezo anioù all. Eun doare plijuz kenañ eo evid eun estrañjour ober anaoudegez ganto dre glask perag eo lakeet an ano-ze warno. Eun istorig a zo stag outo. « Strêd ar pennduig ». Peleh ema al labousig-se ken brudet gand Erig Tabarly ? Diêz kenañ eo kavoud al liou anezañ. « Plasenn an den houarn ». E korn ar blasenn troet gantañ e zellou war-zu ster Ill ema an den-ze. « Strêd an oabl glaz ». N'on ket deuet a-benn da gompren an ano-ze. Gwir eo, an oabl a zo glaz a-zioh ar strêd-se med gwechou all ive eo ken du ha glaou pa vez erh ennañ. Plijuz kenañ eo an temz amzer e Bro-Elzas.

Brao kenañ e vez dre vraz en nevez-hañv hag en hañv. Eun dudi eo mond da bourmen. Med yen-sklas eo er goañv. Gwenn-kann e teu neuze ar vro da veza. Evel ma vije bet riellet ar gwez en êr bet reudet gand eun dorn diweluz. Seblant eur wastell skuillet sukr e-leiz warni a zo war ar blênenn. Izel kenañ e hell ar merkur diskenn. 18 ° C en-tu-all da zero a heller gouzañv gwall aliez. Med binviou ha danveziou ispisial a zo evid lakaad an otoiou da vond en-dro. Buan ha buan e vez an erh skarzet kuit diwar an heñchou. Holen ha trêz e-leiz a vez skuillet warno. Chedenn a vez lakeet war rodou ar hirri-dre-dan. Med n'eo ket diêz ober gand ar yenijenn. O veza n'ema ket an avel evid c'hweza eun disterra e chom sioul an êr hag amzer 'zo kent paka riou. Eur vro eviti-heh-unan eo Bro-Elzas evid doare.

O chom e Strasbourg edon abaoe tri dervez en oaled an ofiserien pa gouezas ar zabatur warnon.

« Emberr e vo red deoh mond da goania e kêr », a lavaras din dicheg paotr an ostaleri.

« Mond da goania e kêr ? Ha perag 'ta ? »

« Da zadorn da noz e vez lezet Alzasianed Strollad ar Barabli da hoari teatr amañ ha setu perag e vez serret ar bar hag ar restaorant evid frañsizien an diabarz ! »

A-bann am-eus sellet outañ. Ne oan ket evid kredi ar pezh a gleven !

Da genta toud peseurt tud eo « Frañsizien an diabarz ? » Meur a wech am-eus bet tro da zelaou an dro-lavar estlammuz-se. « Eur Gall euz an diabarz » a vez greet gand kement den a zo bet ganet en tu all d'ar menez Vosges. Med mond da goania er-mêz abalamour d'an teatr !

Soñjit 'ta tudou ! Daoust ha posubl e vefe lezel kelh ofiserien a vor e Brest gand Strollad ar Vro-Bagan da zadorn da noz ? Me a gav din e vefem degemeret e-giz eur hi divestr gand ofiserien 'zo. Ha koulskoude, e Strasbourg am-eus gwelet tud e-giz Jermen Muller, Siffer, ha tud

all o c'hoari hag o kana war al leur, en oaled an ofiserien, alzasianeg ganto leiz o genou. O tispourbella va daoulagad outo edon pa darzas en-dro din an engroez gand ar c'hoarz. Ne oa nemedon o chom siriuz, stag va fenn a-dreñv war ar gador. Ez-kenañ e oe d'am amezeg kompren n'edon ket diwar chas ar vro. « Euz peleh emao ? » a houlennas hegarad hennez ouzin. « Euz Breiz emao », am-eus respontet dezañ.

« Euz Breiz », emezañ. « Va amzer vartolod am-eus greet e Landi ha brezoneg a oa gand an dud war ar memez mod hag a zo alzasianeg ganeom. Brezoneg a zo ganeoh ive ? » - « N'eus ket ! » E-mod-se eo am-eus greet anaoudegez gand an alzasianeg rag, gwir eo, e Strasbourg, kêrbenn an Europ, e vez komzet ar rannyez-se e peb leh.

Er buro butun, ar varhadourez a ouie n'edon ket euz ar vro ha koulskoude, ingal, beb mintin, hag a-hed ar pevar bloaz am-eus tremenet er vro-ze, e houlenne ouzin eun dra bennag a gomprenen e-mod-se : « Van spilip », ar pezh a dalveze evid « Mar plij ? ». En alzasianeg e vez komzet deoh da genta gand an dud, e galleg pe en almaneg da houde. Ha da houde e teue ingal an dro-lavar koz : « Eur Gall euz an diabarz a zo ahanoh ». Liketenou drolig a-walh a oa peget ouz mogeriou 'zo e 1972. Eur vruderez bennag a zisklerie : « Ni, an Alzasianiz, a vez greet ar wir Europeaned ahanom ». Med ne oa kudenn ebed ken evid al labour. Ouspenn-ze, an darn-vuia euz pennou braz an uziniou a oa « tud euz an diabarz » evel don hag êz-tre e oa kenlabourad ganto. Med eston e oa klevet al lavarenn-ze o tond dibaouez war horre.

Ez-tre eo ive e Strasbourg abuzi e amzer beb noz. Bistrioio ispisial a zo e peb leh. Ar Bierstub hag ar Winstub a vez greet anezo. Meur a daol voutin a zo enno hag eur bern tud bodet en-dro dezo. Pa vez eur gador diberhenn e vez red teurel ar pouez warni ken buan ha tra hag e-mod-se eh en em gaver kichenn-ha-kichenn gand tud a beb seurt broiou, Almanted, Italianed, Suised, Frañzizien, hag estrañjourien all. Ez-tre eo toulla kaoz

ganto ha traou e-leiz am-eus desket ganto. E fin an nozvez e teue kanaouennou a beb seurt ganeom. Pa vez leun e gov gand eun Almant e teu bepred eur ganaouenn bennag war horre. Eun arvest ispisial eo da zul vintin gweled anezo oh en em gavoud war blasenn an iliz veur. Kirri e-leiz euz an tu all d'ar Rhin, o-deus treuzet an harzou. Ar wazed a ya diouz eun tu da vizita kêr, da lavared eo da gaoud eun tañva a-zoare euz gwin ar vro. Ker spontuz eo ar gwin e Bro-Alamagn. Eur werennad gwin gwenn eno a dalv kement hag eul litrad e Bro-Elzas. Setu perag e vez diskennet kemend a voutailadou e korv an douristed. Ar merhed a ya ivez diouz o zu med n'emaint ket e chal gand ar gwin. Gand ar gwistilli ne lavaran ket. Bez e heller selled outo taolet o fouez ganto e staliou gwistilli.

Echu an dervez ganto e lak ar maouezed klask war o gwaz. Diou ha diou e vez red dezo samma eur gwaz bennag evid lakaad anezañ en otokar.

Er bistroiou-ze e kaver bier pe win da lakaad da ziskenn boued ar vro. Marhad-mad eo ha moyen 'zo da hlebia ar hourlañchenn en eur gas d'an traoñ eun tamm kig rost bennag. Med arabad kredi ema ar choukroud war an oll daoliou. Choukroud a zo evel-just ha silzig brao gantañ, med n'ema ket an Alzasianned e chal nemed gand ar boued-se. Gand an dartzenn onion ne lavaran ket. Goap a vez greet zoken ouz an douristed a gav dezo eo ar choukroud « Plad broadel an Alzas ».

Eun digor-kalon ispisial ive a zo dezo : « An amer ». Saouruz kenañ eo an evaj-se : Bier du da genta, eur banneig dister a bikon hag eun takennig dour zitroñs d'e heul mesk-ha-mesk en eur werenn vraz. Saouruz kenañ eo an evaj. Unan a zo mad. Med daou a lak ar spered da nijal hag evid ar pezh a zell ouz an trede e teu dre-vraz, al lonker, da veza laouen. E miz here ema ar gwin nevez en e vrava. Dous kenañ eo hennez. Eun dudi eva anezañ gand eur wastell bennag.

A-benn ar fin am-eus greet va demeurañs en eur gêriadennig tostig a-walh euz an uziniou a reen war o zro.

Rener eul labouradeg eo e-noa roet din chomleh eun ostaleri vad. « Med diwallit », emezañ, « rag eun oristal a zen eo ar perhenn ». Kavet ganin an hent a gase d'an ostaleri-ze eh en em gaven dirag al lez-varn goz. Dilezet e oa bet an ti-ze abaoe meur a warlene ha gantañ an toull-bah a oa stag outañ. Eun iskiz a brizon e oa bet evid doare. Morse em buhez n'am-boa gwelet mogerioù ken farsuz o liou. Tresadennoù a beb seurt ment hag a beb stumm a oa livet warno evel ma vijent bet savet gand eun oristal bennag, eur Picasso mod-nevez eet e belbi diwar re a Riesling pe a Werwurstraviner. An ti a oa uhel kenañ e vogeriou ha prenestou sparlet gand houarn a oa c'hoaz warno evel re eun toull-bah gwirion. Ar hambrou ennañ a oa modern-tre med stumm eul log koz a oa c'hoaz dezo. Al liviou diabarz a oa heñvel tre ouz re ar mogerioù. Diêz-kenañ e oa din kompren petra a dalveze kement-se a livadurioù drol. Degemeret e oan bet mad kenañ gand plah an ostaleri, eur velanegez anezi, war-dro pemp bloaz hag hanter-kant dezi. War ar pemdeiz n'am-boa ket tro da jom em hambro med a-benn diou zizunvez e oe red din keja gand ar perhenn. « Breizad oh ? » a houlennas hennez a greiz-pep-kreiz ouzin. - « Ya, Breizad on ? » - « Brezoneg a zo ganeoh ? » - « N'eus ket ! » - « A ! » emezañ. « Domaj eo. Kartenn Vreiz a zo em bureo ha plijoud a rafe din kompren petra a dalvez stergerioù ha lehiou 'zo. » Distagadur ar vro a oa gantañ en e henou. Eun den bihan e oa, koveg eun disterra. Micherour en ti-gar e oa euz e vicher. Brao-kenañ on-eus dalhet kaoz war an traoù teknikel da genta. Med evid ober plijadur dezañ am-eus taolet eur zell ouz ar gartenn-ze en e vureo. Eur vogeriad levriou e oa al leh-se. Leorioù a beb seurt, priz braz dezo kredabl. E brezoneg penn-da-benn e oa ar gartenn-ze evid doare. Med ne gomprenen seurt ebed euz an anoioù a oa skrivet warni nemed re eun nebeud lehiou e-giz Landerne, Brest... Eno eo am-eus desket e veze greet Montroulez euz « Morlaix ». Mezuz e oan evel-just e-keñver an den-ze a lakee, tro-ha-tro, an alzasianeg, an almanteg hag ar galleg da vond en-dro. Ha

me, d'am zro da houlenn outañ : « Petra a dalvez evidoh al livaduriou ho-peus lakeet war mogeriou ho ti ? » O hedal eur seurt goulenn edo kredabl peogwir ez eas dioustu da gerhad eur voutailad gwin Sylvaner ha diou werenn. Gwerennou gwin Elzas a zo brao da weled ha brao-tre ive e tiskenn ar pezh a zo e-barz. Eur c'hwez dous ha treñk war eun dro a zo ganto ha plijuz kenañ eo o liou da weled. N'edon ket an disterra war-hed euz eun istor e-mod-se. « Ar mogeriou ? Ya ! warno am-eus livet istor va bro dre lakaad ardameziou ar varheien da vond en-dro. » Ha ni da vond er-mêz hag an den da zisplega din dre ar munud peseurt marheien a oa en e vro, petra a dalveze an ardameziou, petra oa hent an aloubadegou e Bro-Elzas, perag e oa eul linenn ruz a-dreuz ar skoed-mañ-skoed. Brao kenañ e teue an displegaduriou gantañ diwar-benn istor e vro. Dre ar munud e tisplegas din istor ar histilli niveruz a zo war blênenn Elzas. « Ar Hesnibourg Uhel ? » emezañ. « N'eo ket eur hastell eo. Eun ti evid an douristed ne lavaran ket. En e gichenn ez eus eur park ispisial evid ar Marmoused ! » Ar wech kenta e oa din klevet eur gentel ken desket.

Hirgarrezegou a oa ive war ardameziou 'zo.

« Gouzoud a rit petra eo an hirgarrezegou-ze », a houlennas ouzin perhenn an toull-bah bet troet en ostelari. - « Feiz ! n'ouzon ket ! »

« Ardameziou ar Rohaned euz a Vreiz int », a respontas din. Hag eñ da staga gand istor ar Rohaned Gwemene hag ar Rohaned Soubiz hag a-dreuz o ardameziou e kontas din eun diverra resiz tre euz istor va bro.

« E Poñdi », emezañ, « e kaver e-barz ar hastell ar memez re hag e Strasbourg ; e palez ar Rohaned e vo posubl deoh gweled erminou Breiz war an nor veur. Digaset e oant bet da Vreiz gand eil gwaz unan euz ho tukezed, Koñstans heh ano. » Ne oan ket evid kredi ar pezh a gleven hag a-greiz-pep-kreiz am-eus goulennet outañ ar pezh a ouie diwar-benn ar varheien deutoneg. « Gangsterien toud e oant », a respontas din krak ha

berr. « N'on ket evid o heñveria gand ho re o-doa lakeet klask war ar Graal zantel. » Hag en-dro e stagas gand istor va bro. Ma ! tudou ! eur hovad mez hag eur hovad gwin am-eus paket war eun dro rag dre ma 'z ee e gomzou en-dro e tiskenne ive forz banneou gwin gwenn er gwerennou. Rag echu ganeom selled ouz al livaduriou er-mêz edom en-dro er bureo. Me a gave din e oa lijer ar plañchod dre zindan va zreid ha tomm kenañ va spered diwar an traou am-boa desket. Rag, nag a draou am-eus desket koulz diwar-benn Breiz ha diwar kêriou an Dekapol.

« Ha Kleber ? » am-eus goulennet outañ evid diskouez dezañ ne oan ket dizek a-grenn. « O », emezañ « lod a gav dezo eo hennez heñvel ouz Moreau e Breiz, da lavared eo eun trubard. Amañ ez eus meur a jeneral o-deus stourmet evid Bro-Frañs en amzer ar Revolusion vraz, Kleber, Kellermann ha Jourdan. Alzasiateg a oa ganto leiz o genou ha skuiz e veze ar jeneraled all ganto dre forz klevet ar rannyez-se. Klemm o-doa savet dirag Bonaparte med hennez a reas eun hej d'e skoaz. N'edo ket ar Horsad e chal gand ar galleg, kredab, peogwir en-doa respontet dezo : « *Laissez les donc parler leur jargon, ils sabrent si bien en Français !* »

Meur a nozvez am-eus tremenet e-mod-se er bureo-ze. A-wechou e veze greet ano euz traou teknikel, gwechou all e teue en-dro an istor. Martolod e oa bet « paotr an toull-bah » e-pad ar brezel. Istor e vuhez a zo heñvel ouz hini an oll Alzasiateg a-oad gantañ. Ganet eo bet en 1916 e teuas da veza Gall en 1918. En alamaneg eo e-neus paket e zeskadurez kenta. Da houde, e 1936, e reas e goñje e marin bro-Frañs kent cheñch bro e 1940 ha da genderhel gand e amzer vartolod e bourz an « Tirpiz » hag ober brezel gand an Almanted. E 1944 e oe greet eur Gall anezañ en-dro. Unan all am-eus anavezet a zo gwasoh c'hoaz e istor. Ganet eo bet e 1916 ive hag enrollet e oe en arme hall e 1939. Paket, toulbahet ha digabestret gand an Almanted e oe enrollet en-dro war an talbenn brezel e

Bro-Rusia. Eno e kavas tu da echap ha paket e oe gand ar bartisaned. Med ne oant ket evid kredi edo an dezertour euz Bro-Elzas, eun den hag a oa gantañ sae ar Wafen S.S. war e gein. Edont war-nes e fuzuilla pa dremennas en e gichenn eur partizan all. Eun tammig alzasianeg a oa gantañ. Dond a reas davetañ en eur ziskouez dezañ ar yalhadig a oa gantañ en e zorn : « Petra eo an dra-ze ? » a houlennas ar partizan ouz ar prizionad.

« Ben », a respontas an den paour, « *un portemonnaie* ».

« Eun Alzasianad eo an den-ze evid doare », a youhas paotr ar strouez, rag ma vije bet euz an tu all d'ar Rhin e-nije respontet en alamaneg. »

E mod-se eo e teuas an Alzasianad da gemer perz er stourm a-eneb an Nazied. Nebeud goude e teue da ober war-dro kirri-nij skipaill « Normandie-Niemen » hag a-benn ar fin eh en em gavas en arme hall a zigabestras Kolmar. Teir gwech e-noa cheñchet e gartenn-ano ha peder gwech ive e-noa cheñchet tu d'e fuzuill en eur ober ken nebeud amzer. Reou all am-eus anavezet ive hag a oa bet paket gand an Arme Ruz. Eur ger-stur a oa ganto e fin ar brezel « Red e vo deom lezel an diou wagennad brezelourien genta da dremen. Ar re-ze a zo fulor enno ha n'int ket evid ober war-dro ar brizonidi. D'an trede wagenn e vo mad deom sevel on diouvreh d'an neh. Evel-se beza greet. Diêz-kenañ e oe d'an ofiserien hall, karg dezo digabestra an Alzasianed euz grabanou ar Rusianed peogwir e oa ganto tud euz ar Forest Du hag ar memez rannyez pe dost a zo ganto. N'eus nemed eun nebeud geriou e-giz « *porte-monnaie* » hag a zo disheñvel enno.

Setu perag e oe red dezo tremen eun arnodenn ispisial dre gomz en Alzasianeg kent kavoud o frankiz en-dro. Ha tra m'edont o kimiadi euz Bro-Rusia e klevjont ar Rusianed o lavared dezo : « *Les Français n'ont pas de culture !* »

O vale dre ruiou ar gêriadenn edon p'am-boa kejet gand ar vestrez-skol. « O chom e ti an oristal emaoz

atao ? » a houlennas honnez ouzin.

« An oristal ? An den-ze a zo hir e skiant ha mad e vefe d'an oll kemer skwer a-ziwarnañ. Eur maill eo war istor ho pro. Meur a wech am-eus bet tro da weled kelennerien skol-veur Strasbourg beza heñchet gantañ war an hent a gas d'ar histilli brudeta. Mad e vefe deoh teurel eur zell a-dostoh war e di. Eur gentel a bouez a zo da gaoud diwarnañ. Ha da houde am-eus gwelet an « oristal » oh ober skol da vugale ar gêriadenn bet kaset davetañ gand ar skolaerez.

Meur a levr am-eus bet tro da lenn er bureo-ze. Eun tamm deskadurez am-eus paket me ivez. Deskadurez a seurt-ze a zo dibourvez kenañ en deskadurez stad. Ar pezh a ouien diwar-benn bro Elzas a oa bet bet dastumet ganin dre lenn levriou Erckmann ha Chatriand ha Rouget de Lisle e-noa lakeet ar Varzeillez kenta da vond en-dro e Strasbourg... Ha setu toud.

Eur strollad Bretoned a oa ive e Strasbourg. Ennañ e kaver tud a ree war-dro traou a-bouez braz er gêriadenn-veur. Me a gave din e oant kentoh « Alzasianed bet ganet e Breiz » eged « Bretoned bet divroet e Bro-Elzas ». Ne oa nemed eun dra hag a ree diouer spontuz deom : Ar brezoneg hag an alzasianeg. Me a gave din e oam dibourvez a-grenn e-skoaz an Alzasianed. Tud euz an diabarz a ree an Alzasianed ganeom kenkoulz hag ar Barizianed. Ne oa nemed eun den a ree enor deom e Strasbourg. Alan Stivell e oa hennez. Ar Vretoned yaouank a oa sod gantañ. Ha beb bloaz e teue ingal da lakaad « an tri martolod da zañsal » war al leurenn-mañ-leurenn.

Peadra 'zo da jom estlammet ha barmet o weled pegen troet eo tud ar vro-ze gand o rannyez ha c'hoaz e vije eet ganin ouz o zelaou. Med a-benn ar fin am-eus soñjet : Med ni ive ar Vretoned on-eus eur yez deom on-unan hag a zo beo buhezeg c'hoaz koulz hag an Alzasianeg. Hag ar yez-se am-boa desket eun tammig anezi e-doug ar brezel diweza e Plouvien e leh m'edon o chom gand va famil med

siwaz ankounac'heet eo bet ganin an disterra am-boa lakeet em spered rag, da lavared ar wirionez, e oan chomet dizeblant-kaer e-keñver sevenadur Breiz. E kêr Vrest e oan bet savet hag e galleg evel-just. Eur yez estren e oa ar brezoneg evidon.

Red e oe din dond en-dro da Vrest evid gouel Nedeleg. Liketennoù festou-noz a oa peget ouz mogerioù an ti-gar ha gerioù brezoneg a oa skrivet warno. Med ne oan ket evid kompren ar ster anezo. Hag eun deiz am-eus gwelet eul levrig, dezañ eur golo ruz, e gwerenn eul levr. Ral a wech on-noa tro en amzer-ze gweled seurt levrioù bet dispaket a-wel d'an oll en eur stal. Meur a levr all da zeski brezoneg, disheñvel o doare, a oa er stal. Prenet ganin al leorig e holo ruz e stagen da studia ar hentelioù a oa ennañ. 27 kentel am-boa lonket buan-ha-buan pa zeuas din ar zoñj da lakaad va ano er skol vrezoneg dre lizer a oa greet ano anezi el levr. Hag e-mod-se, e-korv tri bloavez am-eus studiet kentelioù ar skol-ze.

Ha dre ma 'z ee an amzer e-biou ha va studiadennoù en-dro e kave din e tarze ennon karantez evid va bro henidig. Da genta e oe êz a-walh kompren an anioù-tud ha, da houde, an anioù-lehioù. Ha goulennet em-eus ouzin va-unan perag am-boa bevet em bro heb gouzoud an disterra tra euz heh istor. Dre zigouez eo am-boa greet anaoudegez gand ar yez med bremañ e felle din mond d'an daoulamm ruz evid nompaz chom war-lerh. Hegarad kenañ e oa ar helenner a ree war va zro. Ha, tra eston, bewech ha ma welen eun dra hag a blije eston din e save c'hoant ganin konta anezañ e brezoneg. Nag a liziri, pennadou-skrid berr enno, am-eus bet kaset e-mod-se d'am helenner hag a beb taol e responte din :

« N'eo ket fall, med red e vo deoh studia ar brezoneg spisoh peogwir ez eus liou ar galleg war ho skridou. » Ne oan ket evid kompren perag peogwir e kemeren va zammig yez diwar skwer ar hentelioù bet studiet ganin. Echu ganin va « zro golonial » e Strasbourg e teuen en-dro da Vrest. E kêriadenn veur Penn-ar-Bed e oa heñvel an traou hag a-ziagent. Med giz ar festou-noz a oa o ren

eun tammig e peb leh. Lavaret e oa bet din e oa eur greizenn zevenadurel breizeg e Kêr-Vrest ha mond a reen di da geja gand ar vrezonegerien nevez a oa enni. Ar memez brezoneg a oa ganeom evid doare ! Brezoneg ar skol dre lizer. Hag eun deiz, greet va zoñj ganin ez een da ober eun tamm tro da Blouvien. Kejet em-eus gand kouerien war o leve a oa o chom en eun atant am-boa anavezet gwechall. Diêz-kenañ e oa kompren ar pez a lavaret din med ne oan ket evid kompren perag e oa kemend a ziforh etre ar brezoneg desket ha brezoneg ar bobl. Meur a wech am-eus bet tro da verka an dra-ze. Gwir e tifloupe gwall aliez gerioù galleg en o haoz med stumm o frazennoù a oa disheñvel a-grenn diouz va re. Goude tri miz enklask am-eus dizahet va zahad eston er greizenn zevenadurel. Respontet e oe din e oa brezoneg ar bobl gwall glañv abalamour d'an dud dizek o-doa lakeet anezañ da vond en-dro hag ezomm braz a oa bet euz eur medisn mad evid skarza kuit dioutañ ar siou falla bet miret ennañ a-hed ar hantvejou. Evid ar galleg ez eo ar memez tra. Eur galleg pobleg a zo hag eur galleg mad. An hini a zo lakeet da vond en-dro war al leurenn deatr. Me a gave din edon war an hent a gase d'ar brezoneg lennegel ha nompaz d'eur hoz brezoneg bennag, eun trefodach digomprenuz a-grenn gand an dud seven. Doareoù all a oa evid deski brezoneg hag eur zell am-boa ive taolet outo. Eur bamm e oe ive evidon gweled e oa skriturioù all. Gand ar « zedacheg » am-boa desket va zammig brezoneg hag e kave din e oa fazioù e-leiz gand ar metodou all. Stumm ar frazennoù, koulskoude a gloke mad gand ar re a gleven gand ar vrezonegerien a-vihanig hag el leorioù 'zo ar pez a lakaas ahanon da gredi edo ar wirionez gand ar « brezoneg lennegel » ha nompaz gand hini ar bobl. Meur a zoñj a oa ganin em fenn. Da genta, divenn ar brezoneg dre zeski mad anezañ, da houde mond da jom war ar mêz e leh m'am-bije tro d'e lakaad da vond eveduz en-dro ha da houde ober eun dra bennag siriuze evitañ. D'am zoñj e veze skuillet re a arhant war an tele hag ar radio evid sevel abadennoù dister.

Eun dra bennag a vefe red din ober evid diskouez an hent mad da implijoud an arhant. Ha justamant, edo ar radio o paouez sevel eur priz lennegel nevez. Priz Per Trepos an hini a oa. C'hoant a zavas buan ganin kenstriva ha ma teufe ar maout ganin e rofen va friz d'ar Skol Diwan a oa, d'an ampoent, ar skwer wella evidon evid resteurel da Vreiz ar pezh a oa bet kollet ganti a-hed ar bloaveziou diweza. Daou bennad skrid am-boa savet aratoz-kaer evid ar henstrivadeg-se. « Job Mabig al louarn » hag « Enezenn ar razed ». Diwar eñvorennoù va yaouankiz am-boa savet ar goñchenn genta. E-kichen Landerne, gwechall-goz, e veve eun den a oa bet kivijer euz e vicher. Eur maill e oa evid paka al lern ha meur e istor, gwir pe faoz, a oa bet lakeet war e ano. En o mesk e oa unan hag a gonte e-noa lakeet eul louarn en armel zakr eun iliz. E Ploueskad e oa ive, gwechall-goz, eur masakod deuet da veza sod gand ar c'hoari kanetennou ha lammet e oe digantañ e hoariell muia-karet gand ar person war zigarez n'edo e chal nemed gantañ. Daou venoz e-mod-se a zo a-walh evid lipa eur gontadenn. Evid ar pezh a zell ouz an hini all ez eas buan-tre an traou. Eur houër a zisplegas din doare ar razed war ar mêz hag eur martolod a gontas din penaoz e veze paket, gwechall, ar hrignerien-ze e-bourz ar batimañchou. Tra-walh a oa evid sevel eur goñchenn all. Eur zouez e oa bet din kleved e oa deuet ar maout gand « Enezenn ar razed ». E brezoneg unvan e oa bet skrivet an diou istor ganin.

Med n'edon ket o hedall kemend a drouz war o lern. Da genta am-eus roet va friz d'ar Skol Diwan evel-just en eur zisplega va zoñj er radio hag en tele. Gourhemennou Anjela Duval am-eus bet resevet ha bloaz goude, maouez Traoñ an Dour a ree kemend-all. Med dreist-oll am-boa greet anaoudegez gand tud a beb seurt, brezoneg ganto. Ado edo an oll evid va lakaad da genderhel war heñchou dièz ar skridou.

« Re a drouz ah-eus greet gand da skrid kenta evid dilezel al lennegezh. » Eur gazetenn vrezoneg a embannas va istoriou. En entremar edon. E Ploueskad edon o chom ha

ken disheñvel hag a-ziagent e kave din e oa brezoneg an dud diwar ar mêz e-keñver hini tud desket 'zo.

Meur a hini anezo am-boa lakeet da lenn va skridou hag a beb taol e veze respontet din : « Eun doare a zo dit da zevel ar frazennou. Me a gav din e vefe red dit skriva e mod-all. » Med penaoz ober ?

O keuneuta edon er hoad gand daou vignon p'am-boa strobet va uverniou er gwriziou. Ha me d'an traoñ ! « Ma ! eet out war da gov », a lavaras din Fañch Kouër. Mond war ar hov ! setu eun dro-lavar ispisial evid doare ! Me am-bije lavaret « Koueza war ar hov ». Eur skwerenn all am-eus prenet evid kompren gwelloc'h : « Koueza war ar penn ». E galleg e reer eun implij spontuz euz ar frazenn-ze. Ha meur a wech am-eus bet tro da lenn « Koueza e karantez !!! ». Goulennet em-boa ouzin va-unan ha posubl e vefe din koueza war va fenn ! Posubl eo med da genta e vefe red din troha va fenn, lakaad anezañ war al leur ha da houde ober eul lamm warnañ. Neuze am-eus komprenet frêz ar pezh a ree diouer din : Al lojik e brezoneg, da lavared eo ar pezh a zo anvet ijin ar yez gand tud 'zo. Splann e tarzas din e fazien ganti pa lakeen an traou difiñvuz da vond en-dro. Ne lavarer ket : « An hent a dremen dirag va zi a ya da Bariz. ». Dibosubl eo. An hent n'eo ket eun tapis ma heller mond warnañ e-giz hini Aladin. Lavaret e vefe kentoc'h : « An hent a zo dirag va zi a gas da Bariz. » Neuze am-eus sellet a-dost ouz va mankou. Ha diniver oant. Liou ar galleg a oa warno. Med peleh kavoud eur yezadur resiz war ar poent-se. Dre forz labourad e oan deuet a-benn da lenn ha da adlenn yezadur braz ar brezoneg. Eur yezadur mad kenañ eo hennez evid doare ha meur a dra am-eus desket gantañ. Eur bamm e oa evidon deski ennañ ar stumm nah ha selaou an dud oh ober gand « Nann » war ar memez mod ha gand an « Non » e galleg. Med nann ! med nann ! perag nann aotrou ker ? A -benn ar fin e savas spontuz eun douetañs a vil diaoul ennon. « Neo ket ar memez brezoneg », a veze respontet din evel ma vije bet c'hoaz eur Gall euz an diabarz em bro. Red e oe din

staga gand ar brezoneg en-dro dre jeñj doare. Daou vloaz on chomet en entremar med ne oa den ebed en-dro din evid displega din ar reiz. Pa lavaren n'edo ket ar skiant gand skridou 'zo e veze respontet din e oa mad an traou e-mod-se.

Echu ganin skriva an istoriou a heller lenn el leorig « Enezenn ar Razed ha kontadennoù all », e teuis da veza kelenner er skol dre lizer a oan bet desket ganti. Meur a vrezoneger a-vihanig bet studieren ganin o-deus goulennet ouzin peseurt brezoneg e oant o teski. Ken disheñvel e oa hennez diouz brezoneg o zud o-doa beh da gompren frazennoù e-giz : « Ar gwez o tiskenn beteg an aod » a gaver founuz er metod-se. Ne oa kennebeud all tro lavar ebed ken. Frazennoù bet troet war-eeun diwar ar galleg ne lavaran ket. A-benn ar fin am-eus lavaret e vefe red deom difazia al leoriou-ze ar buanna ar gwella. Respontet e oe din e oa echu gand ar brezoneg koz ha e oa poent braz sevel eur brezoneg a hellfed ober implij anezañ er hêriou braz.

Ne oan ket evid kredi e oa eur « Brezoneg diwar ar mêz » hag « eur brezoneg kêr ». Geriou nevez a vefe red deom sevel ivez evid an traou modern. Eun nebeud anezo am-boa desket diwar ar skol dre lizer.

Ha me da houlenn ouz Fañch Kouër : « Fañch petra a dalvez « *chauffage central* » evidout e brezoneg ? » - « Feiz ! n'ouzon ket ! » a respontas Fañch en eur skraba e benn. Ha me, lorch ennon : « Tommerez kreiz eo ! » - « Tommerez kreiz ? Med penaoz e vo tommet ar hostezioù neuze ? » Al lojik adarre ! Ijin ar yez. Va dilez am-boa roet a-benn ar fin d'ar skol dre lizer-ze.

Gwir eo eo bet savet ar brezoneg er-mêz euz ar skoliou ofisiel. Skol ar bobl eo honnez hag enni ne gaver ket tud hag a zav o frazennoù a-daoliou geriadur. N'eo ket bet ar brezoneg levezonet gand eun akademiez bennag. Eur skolveur eo deuet da veza pobl-Vreiz e-keñver he yez. Ha setu perag e teue ken aliez ar randonerez koz-se war horre « N'eo ket ar memez brezoneg ». Ha gwir e oa. Hag

ouspenn-ze, e skridou 'zo e heller gweled frêz stumm ar gevredigez hall en he gwas. N'eo ket ar yez nemetken, a gav din, a vefe da zifazia med spered an dud bet entanet gand ar « brezoneg modern » e-neus lakeet spered ar Jakobined da ren warno. Jakobined diskreizennet int ! En enkadenn on chomet e-pad daou vloaz. Digalonekaet a-grenn evid doare. Lennet hag adlennet em-eus greet al leoriou bet savet gand skrivagnerien bet desket ar yez ganto war barlenn o mamm med ne oan ket evid kompren perag ha penaoz e lakeent o frazennoù da vond en-dro. Red e oa din deski brezoneg en-dro dre jeñch doare hag e oan staget gand leoriou V. Seitê ha re an Dr Tricoire en eur deurel sellou resiz war « an Assimil ». E-berr amzer am-eus komprenet ar pezh a ree diouer din ha perag e troe ar vrezonegerien a-vihanig diwar ar gont pa glasken da doulla kaoz ganto. Va faziou boutinna a zo deuet din ken êz ha tra. Ne lavarin ket mui « N'on ket ho mevel » med « N'on ket mevel ganeoh ». Ha poent braz e vefe deom digas eun tamm urz en doare-mañ-doare da zeski ar yez. E-doug « *Etats généraux de la culture bretonne* » e Kemper (miz mae 1995) e oa bet tud o-doa goulennet ma vefe savet gand « *laboratoire des langues* » eul leorig da ziplega ar faziou boutinna a lakee ar brezoneg da veza eun droidigez komz-ha-komz diwar ar galleg. Ne lavaran ket eo didalvez a-grenn ar metodou all. Labour pep hini a zo doujabl. Ger ebed ken war ar gudenn-ze er renta-kont bet roet deom da houde. Ar pezh a vez diêz din kompren eo pegen penneg e vez tud 'zo pa vez diskouezet dezo o mankou en eun doare hegarad hag evid mad brasa ar yez. Evid ar pezh a zell ouzin am-eus bet tro nousped gwech da drugarekaad ar re o-deus va lakeet war an hent mad. Hag hir eo an hent-se c'hoaz evidon. Faziou a chomo atao peg ouz va brezoneg. Normal eo.

Displijuz kenañ eo kleved gand estrañjourien 'zo eo bet gwelet ganto n'edo ket ar reiz gand « Tadou ar brezoneg modern ». Meur a wech am-eus bet tro da gleved ne oa nemed galleg ger-ha-ger bet troet ganto.

Va zoñj am-eus greet, a-benn ar fin, respont d'ar

goulenn-ze :

« Barnerien ! Peleh emañ ? » Barnet ha kondaonet e vin war eun dro kredab. Lavaret ez eus bet dija din : « Diwallit ! » Med garanet don eo ennon ober eur renta-kont euz va faziou hag a vo anvet ganin « Eveziadenou diwar-benn eun oberennig », ha, war eun dro, gweled a-dostoh ar mankou a zo bet greet, d'am zoñj, war ar memez mod gand ar vrezonегerien nevez hag a gaver strewet amañ hag a-hont.

Eun tamm mad a sklêrijenn a vo roet deom pa vo embannet yezadur an Aotrou Fave. Med dija e hell ar vrezonегerien nevez tenna o mad dioutañ dre lenn ar pezh a oa bet embannet gand Brud Nevez diwar-benn ar verb *beza* hag an *araogennou*. Ma vefe lakeet an traou-ze da vond en-dro e vefe greet eur hammed war-raog ganto hag e-leh traou e-mod-se « Er ar mor a zo c'hwez ar bezin ennañ » e lennfed « An êr vor a zo c'hwez ar bezin ganti ». Ha d'ar re a gavje dezo ez eus re a heriou galleg e yez ar bobl e houlennfen outo soñjal er « *portemonnaie* » rag gwelloc'h eo evidon-me gweled *petra* eo skeudenn an dra en eun doare resiz eged lakaad eun ano faoz warnañ e-giz « *tommerez kreiz* » pe « *Ti ludua* » pa heller ober gand « *Forn an Ankou* ». « *Tommerez dre zour tomm* » a vefe komprenet mad gand an oll a gav din.

E bro-Elzas 'ta e oa tarzet em spered ar garantez evid Breiz hag he yez med e-barz or bro eo am-eus bet tro da gaoud eun tañva resisoh euz ijin ar bobl hag euz ar yez a ra ganti. Setu 'ta peleh ha penaoz ha gand piou am-eus bet tro da ober anaoudegez gand Breiz ha gand ar brezoneg ha setu penaoz ive am-eus desket perag e vo red deom chom war evez ma ne fell ket deom ober gand eur brezoneg bastardet.

A-wechou ha gand gwir abeg e vez greet ano euz « Brezoneg lennegel ». Fañch Kouër a gav dezañ e vez komzet brezoneg lennegel gand an dud desket. Poent braz eo din ive lavared va zoñj diwar-benn an dra-ze. Petra eo

eur yez lennegel ? Eur yez a zo skrivet gand ar re a oar kaozeal anezi eo eur yez lennegel. Red e vo deom derhel kont euz an dra-ze.

Tri bloaz 'zo eo eet va mignon alzasian da anaon. Oh ober war-dro mogeriou eur hastell koz edo p'e-neus ar plañchod torret e fleñch dindan e dreid ha marvet eo diwar al lamm-ze.

Marvet eo ouz ar stern tra m'edo o klask ar sklêrijenn wirion diwar-benn istor e vro. Va mestr ha mignon e oa bet an den-ze war eun dro.

Anaoudegez vad a vagan ennon en e geñver kenkoulz hag an hini a vagan evid ar re a gendalho d'am hench a war traou gwirion or bro.

**Jean-Claude Miossec**

Kerret. 06 / 11 / 1995.

## Sant-Brieg

Euz Sant Ke beteg ar hap Frehel, mor Breiz a droh en arvor eur horn begeg : bez' eo bae Sant Brieg hag a en em zispak enni en toull donna, trêz hir lfiniag. Evid an hini a dreuz ar rann-vro en eur gemered hent-houarn an hanternoz, an drêzenn striz-se hag he fempill eon a zo ar pennad berr e-unan digor war an dremmwel-mor. Ar perzier, goude beza balzamet an diweza euz o fesketaerien, a werz kartennou-post : n'eo ket sevel eo an dra-ze. An drêzenn-mañ-trêzenn a zo deuet da veza "Les sables d'or les pins" ("Trêz-aour ar gwez-pin") : An dra-mañ a zo mond war-raog, neketa ?

Keoded war eun dro en eun toull ha war eur gompezen uhel etre ar ster Goued hag ar Gouedig, eun tammig en a-dreñv d'an aod, Sant-Brieg a oe pell amzer en dachennad hag a n'e-noa ket c'hoaz kilet ar brezoneg enni dirag ar galleg. Euz an dra-mañ ez eus, er bloaz 1636, testeni Dubuisson-Aubenay : he eskopti, emezañ, « a zo hanter-Haloed hag hanter-Vretoned. E Kêr e komzer hanter vrezoneg, med an oll a oar galleg. » Ouspenn daou gantved goude, stagadenn "Dictionnaire Ogée" (geriadur Ogée), er pennad gouestlet d'ar gêr, a lavar : « Komz a reer galleg ; ar brezoneg, rummou ar vicherourien a oar mad anezañ. » Bet eo savet Sant Brieg gand eur manah Kelt, Briok, unan euz ar "Zent vrogarourien". Briok e-noe an treh war Dudal euz Landreger. Sant-Brieg, evid gwir, he-deus atao he Eskob pa deus kollet Landreger he hini. Just eo, dre m'o-doe mibien Briok diskouezet evid o

eskibien merkou eun doujañs hep par. A-raog an Dispah, da zeiz gouel sant Yann-Vadezour, eur bourhiz euz Sant-Brieg a skoe teir gwech war zour ar ster gand beg e vaz wenn, en eur youhal er wech kenta hag en eil gwech : « Peoh, gleskered, an Aotrou, a zo o kousked », hag d'an trede gwech : « Peoh, gleskered, leuskit an Aotrou da gousked » - hemañ a ranke, evid kas al lid da benn, kousked e-pad ar gousperou. Pell ema an amzeriou-ze ; da houel sant Yann-Vadezour, ne vez klevet bremañ o fraoñval, dindan neo deñval an iliz-veur, nemed korzennou kaer an ograou deuet euz Bro-Zaoz er c'hwezegved kantved, n'ouzer ket dre be heñchou. Ar gêr n'he-deus nemed eur monumant, an iliz-veur-ze, ha ma 'z eo bet adsavet e tle da Zant Gwillom Pinchon ; hemañ e-noa kroget da ober war-dro ar bloaz 1220. Dre ma 'n-oa greet gwalleur an amzeriou beza bet red kreñvaad an difenn, ez eo « simpl ha pounner evel an den a vrezel. » He daou dour karrezeg, harpet war fust solud skoazennou tolzenneg, ha warno o zok mên-glaz beteg o diskoaz, a zo mellou boulouardou hag a ra ged, en il tu hag egile d'ar porched flastret, sonn evel landnehded germaneg. En o harz, da viz here 1799, eo e tiskaras ar Chouanted, deuet er gêr dre laer, an hini a oa e penn ar gêr, Poulain-Corbion. Sant Brieg a zo eet war-gresk en-dro d'al « lestr-mên groz ha mên-glaz trist ». Ar « Sindikad evid an tourism » (syndicat d'initiative), en eur gemered harp war halloud eur chaloni euz ar c'hwezegved kantved, a ra euz Sant Brieg "eur geoded vreo". Ar gêr 'zo eun tamm disterig. Rag ar gêr he-deus tra da blijoud, gand houladennoù an dorgennou hag an traoniennou a ra al leh, lañs poñchou an hent-houarn hag a denn o bir dindan disheoliadennoù ar jardinou hag ar parkou ha, kerkent ha kenta harzou kêr, lammou ar mare e porz ar ster Lege. Eun ti koz bennag mên pe gand eur framm koad, staliou teñval, engroezioù goustad peizanted an devezioù marhad a zigas da zoñj euz ar henskoazell gand mêzioù ar Penteür hag ar Goelo. Evelkent, paourentez kêr en aspadennou euz he istor dezi he-unan a ziskouez ez eo troet muioh war-zu

an amzer da zond eged war-zu an amzer dremenet. Strollad-tiez braz a-walh e-unan war hent-houarn an hanternoz etre Roazon ha Brest, hag e-unan euz eun departamant hag a zo ennañ nebeud a gêriou, ouspenn sez eun eskopti hag eur prefeti, Sant-Brieg a zo eur geoded oberiant, hag a ne dle he oberiantiz nemed nebeud a dra d'ar mor tost kenañ outi. Kreizenn a genwerz, a velestradur hag a dourism ez eo dreist-oll unan euz kêriou rouez Breiz - gelloud a rafed lavared hini kreiz an douar - hag he-defe gellet sacha ha derhel an iñdustri, hag a zo he arouezenn - diazez amañ al liested, gand pouez-dreist ar vetalouriez vihan, hag he orin nevez, dre ma 'z eo deuet peurliesha gand intrudu tud a-ziavêz al leh pe a-ziavêz-bro.

Bez' eo ivez eur greizenn-skol vraz gand eul lise-stad ispisializet e micherious hag e teknikou ar zevel-tiez hag al labourious evid ar stad. Ne vezer ket souezet neuze ma 'z eo kresket diou wech niver an dud e kêr e daou-ugent vloaz ha ma tosta strolladur an urbanism ouz 70.000 den. Eun tour a ugent estaj bennag war gompezenn-uhel kreiz ha diou dachennad iñdustri a ro testenios euz startijenn eur geoded hag a vank dezi, evelkent, harp eur gein-vro hag a gresk warnios pouez maro goustad Breiz etre an daou.

#### Koad Lorj

Koad Lorj hag a gendalhed, e-kreiz ar hantved diweza, da gaoud en-dro dezañ a-gevred ar brezoneg hag ar galleg, a zo e-kreiz eur vro rust, digenvez ha digompez hag a deu enni lein eun dorgenn goude eun draonienn hag ar park labourret goude ar brouskoad hag al leton. Bed-se ar zioulded hag a n'eo ket heb eur gaerded rust a oe gwechall lakeet da vond en-dro ha roet buhez dezañ gand an iñdustri vraz vreizeg a-ziwar ar mêz, hini an neud hag al lien, a veze greet anezo "de Bretagne" ("neud ha lien Breiz"), greet e Kintin, Uzel, Monkontour ha Loudieg. Lien anvet lod "trois quarts" (tri balevarz), ar re all "petites laises" (lehedou bihan), pleget e drailladennoù ha lakeet

e pakadou a dri hant pe bevar hant gwalenn, a veze gwerzet gand marhadourien ar vro e Sant-Malo, Montroulez, Sant Brieg hag an Naoned, paneved e vefent bet kaset ganto, en o hont o-unan, war-zu ar marhad gwella, hini bed ar Spagnoled. An iñdustri-ze a-ziwar ar mêziou a echuas da vond da fall e kenta hanter an naontegved kantved en eur zeni, drougziwez eur gevredigez a artizaned ha kenwerzourien hag a gretae hi o emgleo. Euz an dra-mañ e chom dielloù gwerh, eun dezenn war ar stern hag, e Kintin hag e Monkontour, tiez solud bourhizien hag eun doare langiz melkoniuiz.

#### Monkontour

Monkontour a zeblant diskouez e-keñver he amzer dremenet hag ar beachour, hag a chom heb goulenn digantañ dond d'he vizita, eun dizeblanted trist. Bez' ez eus koulskoude tra da huñvreal e skalierou hag e strêdigou ar geoded-se o vond d'an traoñ, gand he leh beg-douar kreñvaet, hag a echu e aspadennoù moger-dro da goueza en o foull dindan an ilio, etre an toennoù hag ar jardinoù. Er framm buhez klozet-se, a ra enor dezi an talbennoù mên-greun ha pondaleziou a-ziavêz houarn goveliet plasenn striz Penteür, Balzac e-nefe karet lakaad da langisa eur grennardez vourhizez herez ha prizonierez unan euz ar bernious madou-ze lakeet da zevel e kantved diweza ar Roueelez gand komers al lien. An iliz a zo gouestlet da zant Matilin « mignon Jezuz-Krist c'hwez-vad ar Hrist, diwaller gwiniég an Aotrou », a lavar e litanioù ; gwaz heb c'hoant uhellaad a-hend-all, peogwir e-nefe gellet beza an Aotrou Doue, ma 'nefe nemetken bet c'hoant. » Gwerennegou kaer-kenañ euz an Adhanidigez a sklêrijenn an iliz. A-walh eo eur bann-heol heb nerz evid lakaad da veza ruz-flamm dillad Santez Barba hag ar Pinvidig kondaonet gand Sant Erwan da vezevelli evel eun denjentil deuet euz kap "ar Mezer aour". Eur zantual tost, a-ziwar ar mêz hennez, ha lakeet dindan aspedenn ar Zeiz Sant pareerien, chapel Intron-Varia-an-Neh, e Tredaniel, a

zach pelerined all war e dorgenn rohelleg. Eno emaint oll, seiz den bihan an Aotrou Doue, en amhoulou, reudet gand burell ar veneh, renket an eil war-lerh egile, fur-kenañ war ar zichenn dano, rust evel beleien en eul lidadeg pe hegarad, distennet pe verraet, ibil o lagad distrafuill o para, dreist diskoaz ar gweladenner, war zell tud hag a zo dreut o gwel : Sant Livertin hag a bare ar boan fenn, e benn gantañ etre e zaouarn ; Sant Mamert, hag a ziwall ar vugale ouz ar boan gov, a zizolo eur rollad bouzellou kuillet evel troellenn eur bigorn-melhwed. War eun daol ez eus eur haier braz digor hag a ro testeni, pa lenner anezañ, pegen diniver ha pegen disheñvel eo doareou ar zantimant relijiel. Pep hini a verk warnañ e ouestl hag e boan. Bez' ez eus aze danvez founnuz da lakaad da ouela pe da vouse'hoarzin.

#### Lambal

Lambal, hag a zo a-ziouti iliz gaer an Intron Varia, kludet war he zorgenn a-bik, a zo eur gêr vihan all euz ar Penteür hag a varvas enni, er bloaz 1591, an den brudet braz, La Noue, lesanvet "Bras de Fer" (Breh-Houarn), pa oa o lakaad seziz war ar hastell. Fur evel eur hrennlavar a-ziwar ar mêz war êr an amzer, e vev hi, en despèt d'ar gar, da heul lusk horolaj ar mêz. Tra vraz ar gêr eo amañ ar zervij-kezeg, ar "Haras", skeudenn ar maga nobl loened hag a oe, gwechall, gloar tiegeziou Breiz.

\* \* \*

Ar Voul etrezeg ar mên-touch,  
A ya eeun-tenn,  
Damlivet gand moriou ken glaz,  
Keodadou a-bez e toennou,  
Rouedadou bagonou amheuliet,  
Hag a grign leviou.

O va aod difronket !  
Nepell diouz Sant Malo,  
Eur bourk mokeduz a grak-vev,  
Hag a zalh dindan e dour,  
A hrign ennañ eur hog kludet,  
Ex-voto eur sturier !

#### Euz beg-douar Frehel beteg Menez-Mikêl

Euz mogeriou beg-douar Frehel beteg douarou plad divent aochou Menez-Sant-Mikael, ema al lodenn vrudeta euz arvor Bro-Hall. Glaz gand yeot, glaz gand dour, dimezet d'ar mêziou pelajian-ze a gomz Chateaubriand anezo, ez eo kaer kenañ liested he doareou. An natur, al lennegezh hag an istor a zo hadet enni puill. El leh ma 'ma an treh bremañ gand an tourism a-vord-ar-mor, mistri ha martoloded a veze a-struj, gwechall, etre ar vag hag an ero. Euz an inizi Malouin beteg ar skorneg-vor, piou, gwelloc'h eged ar mous ganet war riblou ar Rañs, e-nefe kanet, e-pad e dro ar bed, "Gwerz ar Gedour er hanternoz pennañ-ahel-ar bed" ? ("La complainte de la vigie aux minuits polaires")

Tornadou ruz beg-douar Frehel a zo kaer-dreist. Roh vraz lez-poch ar Falhunerez, hag a zo warni eur bobl a eskell evel en eur houldri, ha kelhiet a eon, a zo kosteziet evel obelisked-mor liammet fall ; ar gwiskadou eet war o hostez a ya o bern beteg ar beg en eur strisaad pennañ-dabenn. Euz neh ar beg-douar lakeet gantañ lorhuz eur gwiskamant brug hag lann, e weler oh en em zistaga war an dremmwel, e beg eur zaez hir, tour-meur Kastell-kreñv "Fort Lalatte". Plantet pounner war eur roh zistag diouz an aod, en eur flastra dindan e dolzenn kelh solud mogeriou tro ha touriou, e ya mad e vent gand tolzenn an douar-braz, en eur echui anezi ha gand an divent goulo a zo dindannañ. Pell eged bae an Onneg, e komañs steudad an trêzennoù hag o-deus ar veneh merdeidi roet o ano da Zant Kast, Sant Jagu, Sant Briag ha Sant Luner hag e

klaskfent warno en aner, e-touez ar gwez hag ar bleuñv, uhelloh eged an trêz hag ar bezin, al leh ma oa ar peniti koz.

Sant Enogan a zigor hent Dinarz. Homañ a zo eur gêr hag eur muze plijuz arkitekterez kêriou-koronk a-vord-ar-mor. Dirazi ema Sant-Malo.

### Sant-Malo

Euz oll gêriou Breiz ez eo an hini hag a ne heller ket he ankounac'haad. En hañv 1944, kanoliou an Almanted hag an Amerikaned en eur denna an eil war egile dreist an iliz-veur dibennet a lezas en o-zav ar mogeriou-tro, med a lakaas an tan-gwall er geoded. Ar burzud eo, en eur adsevel anezi, ar re a oa oh ober, tud a feiz, a skiant hag a vuzul - ha, gwir eo, ne oe nahet netra outo euz ar pez a oa red evid kas an traou da vad - o-deus war an dismantrou, lakeet sevel pe resusitet eur gêr gaer-meurbed hag a ne hell ket eun den a-ziavêz-ar-vro soñjal zoken n'eo ket ar gêr hini an amzer genta, kement kempouez an amzer vremañ, aliez aozet mên ha mên, a ya mad gand an istor, spered hag ene an enezig lorchuz : "Na Gall, na Breizad, Malouad on". Kempouez kenkoulz ha ma kaver keuz e-nefe ar barr-dir, goude beza kinniget e sakrifis ti Duguay-Trouin e-neus espernet eur houliez bennag. « Gwelet euz an diavêz, a skriv Chateaubriand, ar geoded-enezenn a zo heñvel ouz eur hreñv-leh mên-greun. » Evid an hini n'e-neus euz Sant-Malo eñvor ebed, nemed lennegel, ar gêr a zo euz ar re a ro muioh e-leh lakaad da gaoud kerse.

Gwelet euz ar haeou, dreist ar ramparziou, Sant Malo a zo da genta eur geoded hag he-deus toennou ha siminaliou. Siminaliou dreist-ordinal braz-kenañ. An droherien avel-ze gand eun troh serz pe dorret gand balirou, plantet er mên-glaz evel eur zoh en ero, a ya an eil war-lerh egile gand eur zonnded staoniou, skoet a-wechou gand eun horolaj-heol hag o poulza er sklerijenn pallennad divent amhoulou heoliou o tiskenn. Etre lein an toennou beg mogeriet-se, uhellaet gand eur fleurenn-vên e furm eur

flamm troet a-eneb hag eur gouribl hag a zo reñket warnañ steud klasel ar hambrchou a-zindan an doenn gand o zalbenn kromm, ar pantennou hir "mên-glaz" a ya war-draoñ, koaget en hanter-bantenn gand reñkad al lomberiou hag a bount gand o fenn evid riskla eun taol-lagad. Gwechall e helled soñjal e oa eno, dindan, ar vouhal, ar hoad derv koz, harz an treustou ha, dindan bouezadenn an avel-foll, strivadenn al listri troet war o-eneb gand o framm a wir lestr. Gwelet euz neh ar ramparziou pe euz penn pella ar strêdou, Sant-Malo a zo ivez eur gêr hag he-deus talbennou ha prenestou. Ar mên-greun flour, koaget, piket pe bikotet, a wisk eno gand e zolenniez yen kosteziou dibleg ar mogeriou, en eur gas war he hiz amañ hag a-hont balirenn - harpa solud eur pondalez a-ziavêz houarn-goveliet, en eur astenn en eur hempouez striz steudenn ar hroaziou-prenest gwenn a zivalvenn enno er zell damer du ar harrezennou munud. An oll vein-ze, tolzenneg pe blaket war ar voges, a zo gwarantet ez int nobl e gwirionez gand nij kromm eur skrev o trei da ober e sinadur etre daou wardleh, a-zioh ar hranellou. Evid gwir, Sant Malo a zalh gwir-dreist eur voges-dro a-bez a ramparziou, boulouard heb distag, a-wechou ledannaet en eur blasenn ha deuet da veza habask-kenañ abaoe an amzer ma veze distaget skouadrenn houez an doged. Ma teoa, e tu ar porz, ar voges-dro e rakker ar zavennou-douar a-vremañ, dirag an doñvor, e chom gwirizennet e roh koz Aaron, en eur ginnig war an trêz ar mor hag an enezennou, eun digor meurdezuz.

Kêr-vor ebed ne verit kement beza anvet "kloz".  
E goudor ar ramparziou, estachou izella an tiez-tro, gand o frenestou doubl moraillet, serret war ridochou teo, a zeblant beza interet e strad eun douvez. Ar strêdou, etre talbennou an daou du, an oabl hag ar pavez, a zigor er mên, odeou don. C'hwez fall iliz-keo ebed koulskoude, untonelez arkitekterez arme ebed. Santoud a reer e peb leh ar mor hag al listri. Ar mên-greun a ro brokuz skeul e liviou griz. Ar strêdig a ya war draoñ e skalier, a rikl

dindan eul leh-tremen bolzeg, a red a-hed ar pondalezioù, a echu e korn eur porz hag a skrij ennañ war al leton nevez eur wezenn yaouank voan. Bez' e oa e tri hantved diweza ar Roueelez, er hloz-kêr-ze, maget gand ar hoñvers hag entanet gand redadegou ar gourserien perziou-mad braz-kenañ a nerz-kalon hag a breder evid beza gellet lakaad da zond er bed kemend a dud-veur hag a sperejou seven-meurbed pe droet war an avantur. Cartier, Duguay-Trouin, La Bourdonnais, Surcouf, Maupertuis, Lamennais, Chateaubriand. Evid adkemeret barn ar memez Chateaubriand, hag a ne skuizas ket Sant Malo gand e weladennou : « An oll draou-ze n'int ket re fall evid eur voger-dro hag a n'eo ket par da hini jardrin an Tuileries. » Er-mêz euz ar voger-dro eo e fellas dezañ diskuiza : « Ar pik gwenn-ze taillet er roh eo al leh e-neus choazet d'e gorv maro. » Flaubert a droas endro d'ar bez, a lakaas e zaouarn warnañ. Sartre a strillas gwinegr warnañ. Ar vourhizien, hervez an amzeriou, a ro eur salud disheñvel d'ar veskonted.

Da genta, gand eun Eskob, Alet, deuet da veza Sant Servan, a gouezas e reñk dister a fabourz Sant Malo, pa oe kaset sez an eskopti da enezig Aron. Ne zavas euz koll he galloud nemed gand an Dispah a azroas dezi he emrenerez hag he anvas Porz-Solidor evid digas da zoñj euz an tour brudet, savet war an aod, war ribl ar ster Rañs. « Poliseret rust lakeet da ober gward er bloaz 1382 gand Yann IV, ar zaver braz. Den ebed ne helle dond na mond dre ar ganol heb e aotre. » War-dro hanter ar hantved diweza, Sant-Servan a oa c'hoaz evid an dud-avor (ar Marin) eun arsanaill hag eur santier da zevel bagou. Ne hellfed ket neuze beza souezet he-defe "kêr an amiraled" lakeet er bed tra a-walh evid anneza eur zal vraz a-bez euz muze traou ar mor gand poltrejou tud vrudet. En amzer-vremañ, c'hoar hevell-ze Sant Malo ha jalouz outi, he-deus kemeret he retred a borz hag a vartolodez, hag a zav bleuñv euz ar broiou all a-dreg mogerioù mên-greun hag ilio he jardrinou prevez. Tostig, war-zu ar hreisteiz eo ema uzin ar ster Rañs, an hini a

vez lakeet da vond en-dro gand ar mare, savet etre Beg ar "Vriantais" hag hini an Dañvadez, hag a stank ar ster gand he chaoser braz-kenañ, diazezet war skoazennou eur porched pazenneg. Poulzad ar mor-braz a zo amañ, evid gwir, ampl iskiz, dre ma teu houlenn ar mare atlanteg da steki ouz ar Hustentin.

Er genou, ar hemm etre live an uhel-vor hag an izel-vor a deu goude a hell beza 13,50 m, pa zistaol red ar ster Rañs, da boent ar reverzi, pa vez gantañ an dour en e greñva, kement ha teir gwech ar pezh a ruill hini ar stêr Ron pa vez an dour-beuz ganti en Avignon. Nerz ar bolzennou-mor lakeet lusk enno, dre ma 'z eo dalhet evel-se hervez an eur hag ampled ar chal hag ar dichal, ar chaoser hir eeun he-deus greet ivez ma 'z eus gellet ober eun hent da vond euz an eil tu d'ar ster d'egile.

Nebeutoh e taleor da ze hiviziken war riblou ar stêr Rañs, a zo warno « manerioù koz euz Breiz an Dalh ha tiez nevez euz Breiz ar varhadourien. » An tiez, a vouskomz Chateaubriand anezo eo ar re vrudet a reer anezo "Malouinières" (da lavared eo : "re dud Sant-Malo, a oa bet lakeet sevel anezo gand paramanterien Sant Malo, evel "Magoned ar Bosk", kerkent ha ren Loeiz XIV ha beteg an Dispah, e kornioù douar didrouz ha sioul gand gwez stank ha dour dalhet, evel ma vefe bet o menoz beva a-wechou en em dennet diouz an don-vor, ar goullo, an avel hag an oll rouestlou a ra riskl ar merdeadurezioù. « Sevel a rejod anezo, a lavar atao Chateaubriand, en amzeriou a oa enno ken pinvidig marhadourien Sant-Malo ha ma lakaent piastred da frita en devezioù ma teue dezo beza krakvezo ha ma taolent anezo d'ar bobl dre ar prenestou o vervi c'hoaz. » Gand o brokustez gand ar marh hag ar hoad presiu, e veze ganto kemend a lorh ha ma ne helled ket soñjal e Pariz : « A-wechou ar jardrinou a ziskenn war an diribin beteg an aod, a-dreg gwaregou eur porched gwez-till, dre eur golonneneg gwez-pin, e penn eul letonenn ; dreist tulipez eun dachennadig, ar mor a ziskouez e listri, e zioulder, e varradou-amzer fall. » Kement martolod deuet beo euz

ar brezelioù hag ar peñseoù e-neze ivez e “valouinière” euz an eil troh, hag a deue prad enno, e-touez al legumach, etre ar bodou-roz, « eur bod-te Kaienn, eur bod-bleuñv euz ar Chin, erfin eun eñvorenn bennag euz eur ribl all hag eun heol all : bez’ eo hent ha kartenn mestr al leh. » En amzer-vremañ, La Balue, Le Bost, La Mettrie-aux-Houets, a laka da badoud kaer-dreist dispignou re vraz pennou-braz gouestlet d’ar henwerz dre vor.

### **Yves Le Gallo** **Brezoneg gand Yves Miossec**

## **A beb seurt**

**Goulenn** : daoust hag-eñ e vefe e-touez lennerien Brud Nevez unan e-nije c’hoant kompozi skridou evidom ? Kalz a labour on-eus d’ober, ken e brezoneg hag e galleg. Prestet e vefe eur homputer, ha diskouezet penaoz ober gantañ. Evel just, ne vefe ket paet al labour-ze, pa ne baeom ket ar re a labour evidom.

Gand ar gevredigez **Kinnig** e vo eun deveziad preder e Treglonou, e brezoneg, d’an 9 a viz meurzh, euz 9 eur da 17 eur.

Adaleg 9 eur : **An Emzao hag an tu-dehou pella**, gand **Ronan Kalvez**, kelenner Istor.  
Da greisteiz hanter e vo ar pred.

Adaleg 14 eur : **Ar re yaouank hag an tu-dehou pella**, divizou renet gand ar zindikad **Dazond**.

Evid lakaad hoh ano, skrivit da Alan Kervenn, 7 strêdig Kerivin, 29200, Brest. (gand eur chekenn 30 lur evid ar pred, war ano Kinnig-Brest).

**Bretoned ha Basked** : Harzet ‘z eus bet eur bern Bretoned p’o-doa roet bod hag oz da Vasked a oa ar Houarnamant spagnol o haloupad war o lerh pa ne felle ket da houmañ rei he frankiz da Euskadi, pe d’an nebeuta sevel eur referendom evel ma’z eus bet e Bro-Gebeg gand ar Houarnamant kanadian. E-pad an amzer-ze e oa Korsiz o pourmen dirag an tele, armou deuz an druill, ha deuz ar re nevesa ganto, heb na vefe lavaret netra dezo. Geo, eet e oa Ministr an Aferiou diabarz da zivizoud ganto, med dioustu pa’z eo en em gavet en-dro e Pariz, o-deus lammet e-barz e vuro « Tierned » Bro-Gors, ha, sañset e-nije lavaret dezo ar hontrol deuz ar pezh e-noa lavaret d’ar re « armou ganto ». Ma ! Re êz e vefe ober evel Kanadianed, sur.

**Gwirioù ar minoreleziou** : Hervez ar gazetenn *Le*

*Monde* (12-1-96) e-nije lavaret Fañch Mitterand e Colorado Springs : « Afer vraz an XXI<sup>ved</sup> kantved a vo kavoud eun doare da lakaad da genglota asamblez daou dra : kaoud « kevredigeziou » braz, a vo red sevel anezo, ha gwir peb « rann-gevredigez » da lavared ez eus anezi. Red eo ma vo krouet er bloavez 2.000 « gwiriou ar minoreleziou », asamblez gand urziaduriou etrebroadel evid ma vo unanet ar muia-posubl a vroioù. Peotramant e vo freuz ha reuz a vil vern. Den ne vo espernet. Er Stadou-Unanet, an ezomm ma vo deuz an digreizenna a vo dreist d'ar Stad-federel. Memez mod e vo er Brezil. Er Hanada ez eus kudennou heñvel. Kaoz zo bet deuz ar Beljik, Bro-Spagn hag ar Hatalogn. Daoust-hag-eñ e vo kavet ar bolitikerien, an dud a lezenn gouest da reñka an traou en eur bed ken braz-divent, gand eun nebeud kreizennou-federaliza evid ma vefe eur gwir etrebroadel. Ha war eun dro, ha barreg e vim da houzañv gwiriou ar minoreleziou evid ma hello pep hini beva hervez e hoant ? »

Merzom dioustu n'eo ket bet meneget Bro-Hall gand Mitterand. Marteze e vefe-hi eur « vinolerez » (ar pezh a zo gwir), heb « minoreleziou e-barz » ?

Evid bremañ, med marteze e cheñcho an traou a-benn ar bloavez 2.000, e vez roet respont ar Houarnamant hall amañ e Breiz hag e Korsika.

**Diskleriet hervez al lezenn** a vez merket war on oll leoriou. Savet e oa bet al lezenn-ze e 1943, sur a-walh eun doare da zelled a-dost ouz ar pezh a oa skrivet. Adreñket goude an Dieubidigez, e tleom kas 4 skwerenn euz peb leor d'al Levraoueg vroadel e Pariz, 1 da Vinister an Aferiou diabarz, ha 2 da Levraoueg Kêr-Roazon. N'oneus netra a-eneb kas beb a leor d'al Levraoueg Vroadel na da Roazon. Med perag kemend a leoriou ? Evid ober petra ganto ? Ha petra a ra ar Minister euz an Aferiou diabarz gand e skwerenn ?

Gwelloh 'zo. Bete vremañ e veze kaset al leoriou-ze heb paea. Ma ! red eo bet paea war urz ar Houarnamant,

e-pad... 8 teiz ! Neuze eo en em zislavaret ar Houarnamant ha bremañ e kasom anezo heb paea, med e vez paeet gand al levraouegou hag ar Minister evid kas en-dro dim ar follenn diskleria. Gwaz a ze evito !

Freuz ha reuz a zo e-barz **skolioù laik** ar Finister - ha sur a-walh e vo dizale kemend-all e-barz ar skolioù kristen. Felloud a ra d'ar houarnamant serri 57 klas pa vefe nebeutoh a vugale. Gwir eo, pa ne chom bugel ebed e-barz eur barrez e vez red serri ar skol. Med eun tammig re bell e ya ar Minister. E-leh ober e vad euz ar fed-se evid ma vefe nebeutoh a skolidi e peb klas, e vo kresket niver ar re-ze c'hoaz.

Goulenn 'zo evid klasou diouyezeg galleg-brezoneg. Sañset e vefe digoret pevar hlas, med e vefe nahet ober e Plougerne hag e Ploeur.

Marteze e vo digoret eun trede skolach Diwan er bloaz a zeu, e Plunered, e-barz ar Morbihan. Evid skoazella e hellit kas arhant da A. Raballand, 17, strêd Erquy, 44300 An Naoned.

Manifestadegoù zo bet gand kerent skolidi Diwan, a vez nahet outo tremen e brezoneg an arnodenn istor-douaroniez, daoust m'eo bet kelennet a-viskoaz an traou-ze dezo e brezoneg. Hag e heller ober en alamanteg !

Evid pezh a zell ouz ar h-CAPES brezoneg, e vefe red kaoud muioh a blasou, pa'z eus muioh-mui a vugale o houlenn deski ar brezoneg.

**Gand Sked**, e Brest e vez kevredet an darn-vrasa euz ar hevredigeziou a ra war-dro kultur Breiz er horn-bro. Prezegennoù, diskouezadegoù a zo. Perz he-deus kemeret e Fest ar muzik, savet 'z eus bet eur film video a-ziwar Fest ar zoniou, teatr zo bet. Da zul diweza beb miz ez eus eur fest-deiz - netra da baea evid mond e-barz - en Tara-Inn, er Porstrein (porz koñvers).

Bet zo bet eun diviz e Gwinevez gand Naig Rozmor ha Per

Chapalain (ar mèt), diwar-benn **doareou-beva** 50 vloaz 'zo. Kaoz zo bet deuz ar ganedigeziou, an dimeziou, hag evel-just deuz ar maro, pa'z echu evel-se ar vuhez. Sur e hellfe an daou skrivagner-ze rei dim eul leor bourruz, hag a-bouez, diwar-benn an traou-ze.

E Lezneven ez eus eur post radio, « **Radio Emeraude** » e ano, a vez skignet gantañ eun abadenn « War bed ar Gelted », bemdez nemed d'ar zadorn ha d'ar zul, da 8eur 15, kreisteiz ha 6 eur noz. Eun hanter- eurvez e pad. Gand Gi Keltik, sekretour ar Vro-Bagan e vez renet.

Savet 'z eus bet eur gazetenn nevez « **Bretons d'ailleurs** » gand ar Vretoned divroet. Evid kaoud anezi, skriva 18, rue de Belzunce, 75010, Pariz.

Gand Morvan **Marchal**, eur paotr euz Vitre, e oa bet savet e 1923 ar banniel Breiz a vez gwelet eun tamm partoud bremañ. Marteze e vefe bet mad nompaz ober gand liviou trist ar famill kapesian De Dreux, bet lakeet war or chouk gand Fulup-Aogust. Ma ! Adinteret eo bet Marchal e Châteaugiron (e Pariz e oa bet interet da genta e 1963).

Teatr e kembraeg evid ar skoliou a vo e Aberystwyth, « Agor drysau » (Doriou digor) euz an 20 d'an 23 a viz meur. Ne vo netra da baea evid mond e-barz, ha moyenn zo da gaoud eur yalhad evid mond. Skriva da Cwmni Baddon, Aberystwyth, Dyfed SY23 2NN (Fax : (01970)611223. E galleg e oa al lizer on-eus bet.

## Mikael Madeg Renabl anoïou ruiou ha plasennou Bro-Leon

75 pajenn

30 lur

Emgleo Breiz

## Yann Brekilien Doue a ziskaras an tour

Eul leor 236 pajenn  
70 lur

Brud Nevez

**Youenn BRUSK**

**Kuzuligou en avel  
Flustradoj en la vento**

Haykouiou

30 lur

Brud Nevez

**Jean Roparz**

**E Bro Yvonne**

(5 levrenn bet embannet)

50 Lur peb levrenn  
Bez' e heller prena levrenn dre levrenn

Emgleo Breiz

**Moan**

**Ar pevare gourhemnn  
a Zoue**

40 lur

Ar Skol Vrezoneg

**KENSKOAZELL gand IWERZON**

**Evid gouzoud  
ar pezh a hoarvez e Bro-Iwerzon**

E Brest : Kreizenn sosial de Penn ar C'hreac'h, ru ar  
Professeur Chrétien.

Koumanant-bloaz :  
Rmied, tud dilabour : 50 L  
Studierien : 80 L  
Re all : 100 L  
Skoazell : 150 L hag ouspenn.

Chekennou : "Solidarité Irlande".



